

S K O L

DASTUMADENN A GELENNOURIEZH

NIVERENN : 16

1961

Raklavar.

" BREIZH HAG AR BED ".

Eus an 10 a viz ebrel 1954 betek an 30 a viz kerzu 1956 - e-pad tost da 3 bloaz eta - em boa skrivet 55 pennadig brezhonek evit ar gazetenn sizhuniek " RENOUVEAU" dindan an talbenn : " Breizh hag ar Bed". Eizh anezho a oa gouestlet d'ur veaj a ris e 1956 e kreis - teiz Bro-Gembre hag adembannet ez int bet gant " BARR-HEOL" gant an titl " Eus Breizh da Gembre".(B.H. niv.27,mezheven 1961) Adalek 1957 ne voe embannadur ebet evit Breizh-Izel hag e paouezis da skrivañ.

Klask a raen tizhout ar vrezhonegerien a-vihanik en Aodoù-An-Hanternoz. Setu perak ec'h implijen ur yezh eün, poblek-kenañ hag an tostan ma c'hellen d'am rannyezh c'henidik, hini Treger Vihan etre an Trev hag al Leñv. Fellout a rae din ivez sevel pennadoù bev, gant fe- doù tennet eus ar vuhez a-vremañ ha setu perak ez int diunvan a-walc'h a-wechoù. Kalz a zo bet aozet d'ar red, goude koan, dre ma oa ret la- kaet ur skrid bennak er post an deiz war-lerc'h. Titloù souezhus, is- kis zoken a roen d'am fennadoù evit dedenn evezh al lennerien hag o atizañ da vont pelloc'h. Ha lennet e vezent.

Diwar ali ar mignon en deus goulennet diganin o adembann em eus renket anezho diouzh an danvez, kement ha ma c'hellen da vihanañ. A-hend-all n'em eus kemmet netra. D'am soñj e c'hellont bezañ ur skou- er eus ar pezh a c'hellfe bezañ graet e Breizh e pep kelaouenn c'hal- lek : pennadoù brezhonek diwar-benn ar vuhez hag an darvoudoù a-vremañ.

An talbenn " Korn ar Brezhoneg", bet implijet gwechall gant an " Ouest-Eclair" ne blije din ha dibabet em boa " Breizh hag ar Bed" evit diskouez e fell din komz diwar-benn pep tra hag en un doare per- sonel ha dieub a-walc'h evel ma vo gwelet. Setu perak ivez n'eus ket bet fellet din o adkempenn ha pa vefe zoken evit tennañ frazennoù hag a zisplij din pe reoù all ha na glotont ken gant va menozioù. An das- tumad a ginnigan hiziv da lennerien SKOL a zo evidon da gentañ un tes- teni.

Herve Konan.

Pediñ a reomp ho lennerien da verzout ez eo bet kresket priz ar c'hou- manant eus 2 LN en abeg da devder an niverennoù embannet e 1961 hag an niverennoù a vo embannet e 1962 :

" AL LENNEG-VEZH VREZHONEK DRE AN TESTENNOU", eil levrenn (200 pajenn)
" VEZHIADENNOU DA C'HERIADUR ROPARZ HEMON", gant F.Kervella.(150 p)

hag un niverenn gant pennadoù a bep seurt diwar-benn ar skolioù.

DAVID HA GOLIATH

Evit labourat a-du gant ar Bleun-Brug n'eo ket a-walc'h gwiskañ ur c'hoef pe ur chupenn ha mont d'ar gouelioù e Kallag pe e Landivizio en ur ganañ kantik Sant Erwan pe Bro Gozh Ma Zadoù, pe draoù all. Labourat a-du gant ar Bleun-Brug a zo stourm da virout bev e Breizh ar Feiz hag ar Yezh. Ur stourm kalet, heñvel a-walc'h ouzh hini David enep Goliath.

Evidomp-ni ar Feiz Gristen n'eo ket hepken ar relijion wirion, met ouzhpenn c'hoazh ar relijion he deus stummet ene Breizh hag he fobl. Ar Frañs Ofisiel a zo digristen ha dizoue. Penaos e c'hell ur vro nac'h ar pezh a zo bet diazez buhez he fobl e-pad 19 kantved ? Gouarnamantoù ar broioù all a anavezan n'int ket digristen daoust ma lezont gant pep hini frankiz da heuilh e relijion. Evidon ar re a glask lazhañ ar relijion gristen e Breizh a glask distruj Breizh ha netra ken.

Tud Bleun-Brug a labour c'hoazh da virout bev ar Brezhoneg. Start eo. Ha pa gouezfe ar c'hurun war hoc'h iliz (Doue ra viro !), petra a rafec'h ? Adsevel anezhi, moarvat, mar doc'h un den a galon. Marteze e lavarot din, anavezet eo an diskan, ar Relijion n'eo ket stag ouzh ur Yezh, evel m'eo stag ar winizhenn ouzh ar blantenn-ed. Gouzout a ran mat ivez n'hell ket ur blantenn bevañ hep gwrizioù. An dud hag a vez troc'het diouzh amzer dremenet o bro a zo plant hep gwrizioù, distag diouzh pep tra. N'eus nemet un dra hag a gont evito : ar gonid. N'eus ken netra sakr, na familh, na yezh, na relijion. Gras Doue a zo ur c'hreunenn, ha pa gouez war douar mat e tiwan. Kalonoù ar Vretoned a oa douar mat. Sevenadurezh an apero hag ar "pin-up" a zo douar fall-daonet.

Gouzout a ran c'hoazh ne stourm ket ar Bleun-Brug hep gonid. Doue en deus krouet kalon an den evit karout e dad hag e vamm, e vro hag he yezh. Ne gav ket din e vefe bet krouet ar Vretoned evit bezañ kaset dre o fri gant kanfarded Pariz. Santout a ran o sevel ur yaouankiz nevez. Dec'h c'hoazh e oa digas. Hiziv e c'hoari biniou. Arc'hoazh e klasko kompren kudennoù Breizh. Ret eo esperiñ e c'honezo, c'hoazh ur wech, David war Goliath.

15.5.55

()()()()

4

DEVEZH AR BREZHONEG

Disul kentañ e vo graet en hon departamant 4vet "Devezh ar Brezhoneg" gant aotre Ministr an Diabarzh hag ar Prefed. Perak ar gest-se ?

Da gentañ evit dastum arc'hant da brenañ pe d'embann levrioù-skol brezhonek. An holl a oar ez eo permetet bremañ kelenn ar brezhoneg en holl skolioù, tamm pe damm, well-wazh un eur bep sizhun. N'eo ket kalz, zoken ma vije kelennet ar yezh e pep skol, met gwelloc'h eo eget netra.

D'an eil, reiñ lorc'h d'ar Vretoned eus o Yezh. E kalz a gêrioù e vo gwelet ar maer, an noter, ar medisin, an apotiker o werzhañ arouezioù hag oc'h astenn o chipot. An aotrounez vras-se n'o devo ken nemet un dra d'ober : komz brezhoneg aliesañ ma c'hallint, er ger hag e pep lec'h, pe deskiñ anezhañ. Tamm ha tamm ec'h adkavo neuze hor yezh he luf. An dud uhel a ro dalc'hmat an ton : dezho d'ober o dever penn-da-benn.

C'hwi ivez a ray ho tever en ur reiñ ho prof. Ur vezh eo avat e rankfe ar Brezhoneg bevañ diwar an aluzon. Ar Vretoned a bae tailhoù d'ar gouarnamant. Petra a vez graet gant o arc'hant ? Milionoù ha milionoù a vez dispignet bep bloaz evit skoazellañ ar galleg er broioù estren hag evit paeañ skolioù gallek e kêrioù bras ar bed. E-keit-se, ar Brezhoneg a vez roet dezhañ plas ar paour, pa vez plas evitañ. E-keit-se, ar Brezhoneg a zo o vevañ diwar an aluzon, ha n'eo ket aluzon tud ar c'hreisteiz, met hini ar Vretoned. Evel-se, ur wech ouzhpenn, e rank ar Vretoned paeañ div wech : tailhoù ponner evit yezh an amezeg, hag un tamm aluzon evit o hini.

Koulskoude, kement-se a zo seblant vat. Ar bobl hag a c'hell ober sakrifisoù seurt-se evit he yezh a zo enni c'hoazh c'hoant ha nerzh da vevañ. Ar bobl-se a gerzh war hent ar justis, ar justis a roio d'ar Brezhoneg ar plas hag an arc'hant a zo dleet dezhañ evit chom bev, kreskiñ ha bleuniañ.

21.5.55

() () () ()

A R J O A W A R A R M A E Z I O U

Unan eus merkoù hon amzer-ni a zo sur-mat he c'harantez evit ar c'honkourioù a bep seurt a weler... Darn a vez savet gant marc'hadourien evit gonid arc'hant. Darn all a vez lanset evit entaniñ ha kalonekaat intrudu mab-den. Un tamm helebini etre an dud a zo bet a-viskoazh un andon a labour hag a blijadur.

E-mesk ar re ziwezhañ-mañ e c'hellomp lakaat konkourioù an Y.K.A.M. (Yaouankiz Kristen ar Maezioù). Anavezout a rit holl bremañ : "Priz ar Joa". Nevez 'zo ez eus bet krouet unan all : "Ar Joa war ar Maez". Pal ar c'honkour-mañ a zo sevel un dastumad kanaouennoù ha kontadennoù graet diouzh an dud diwar ar maez, hag aozet gant profesioneled pe amateurien. War ar maez, an deiz a hiziv, an dud a gav hir an amzer, dreist-holl d'ar sul. Alies e lavar ar re gozh : "Pa oan yaouank, e ouie an dud kemer o flijadur, bremañ n'ouzont ken !" Siwazh, re wir eo.

Gwechall e oa kanaouennoù evit pep tra, zoken evit traoù ken disheñvel ha labourat ha dansal; kontadennoù, rimadelloù, divunadennoù evit ar veilhadegoù; ha c'hoarioù yac'h evit ar c'horf hag an ene evit ar sul. Ar vuhez modern he deus hanter ziskaret ar sevenadurezh-se. Ar journalioù ha muioc'h c'hoazh ar radio o deus skuilhet war ar maez diduamantoù prefabriket, alies dizonest, ha peurvuiañ lazhus.

Diduamantoù prefabriket. An den n'en deus ken d'ober nemet lenn pe selaou. An den n'eo bet graet evit degemer hepken, met evit reiñ ivez; ezhomm en deus da zisplegañ dre ar gomz, dre ar jestr, pe dre labour an daouarn, ar pezh a zo en e galon hag en e spered.

Diduamantoù dizonest. Takenn ha takenn e silont e kalonoù o lennerien hag o selaouerien ur moral dizoue a vougo abred pe ziwezhat ar vuhez kristen.

Diduamantoù lazhus. Ar re yaouank o deus dilezet tamm ha tamm tenzorioù ar re gozh evit degemer an disterachoù-se. Laeret int bet hep gouzout dezho.

Ha koulskoude, peseurt pinvidigezh en dije gallet an den tennañ eus ar binvioù modern-se, eus ar radio da skouer. A-drugarez d'ar radio em eus graet anaoudegezh gant muzisianed vras ar bed ha desket zoken ar saozneg. Met perak n'he deus ket desket din karout ha kanañ kanaouennoù Breizh-Izel ? Displegañ kontadennoù ar mammoù-kozh ? E broioù 'zo e vez graet. Er Frañs, moarvat, e vije kontrol da spered "L'Une-et-Indivisible" !

17.7.55

()()()()

R A D I O R O A Z H O N

Ar radio a zo galloudus. A-drugarez da Radio an Ejipt ez eo deut tud Afrika an Hanternoz barrek da intent an Arabeg skrivet a zo pell diouzh an trefoedachoù a gomzont. En berr amzer en doa graet ar Radio ar pezh en doa c'hwitet warnañ ar c'hazetennoù. M'en dije graet kement-all ar Radio e Breizh, n'o dije tud Wengamp tamm poan ebet o kompren re Gemper, pe zoken re Wened:

Ha koulskoude hon eus e Breizh un tamm brezhoneg war ar Radio bep sizhun, un hanter eurvezh ! Setu da vihanañ ar pezh a c'heller lenn war n'eus forzh peseurt Programm-Radio. Rak me, gant ma holl bolontez vat n'on ket bet deut a-benn da glevout ervat un abadenn vrezhonek.

Ha hervez, n'on ket va-unan. E niverenn ziwezhañ "Barr-Heol", kazetenn drimizieki Bleun-Brug eskopti Sant-Brieg, e kaver ur pennad hir a-walc'h diwar-benn kudenn ar Radio Brezhonek. Meuleudi e ro d'an abadennoù o defe selaouerien niverus e kornioù'zo. Rebechiñ a-ra ivez meur a dra. Un hanter eurvezh bep sizhun a zo kalz re nebeut : un askorn taolet da lipat e korn ar plouz. Radio-Roazhon, war orjalenn Kimerc'h, ne vez ket intentet e Breizh a-bezh. An abadennoù a zeu da vezañ re heñvel an eil ouzh eben. Ar spikerien, evel just, n'int ket da damall. N'emaint nemet daou ha diaes e vefe ober gwelloc'h.

Ar vrezhonegerien avat a c'hellfe ober gwelloc'h : krouiñ ur gevredigezh selaouerien evit difenn o droajoù. Daou zen o deus lakaet en o fenn sevel ur seurt kevredigezh : Ao. Person Bulien hag an Ao. Abel Omnes, eus Plouvouskan. Kasit hoc'h anv d'an eil pe d'egile.

Evel just n'o devo tu da glemm nemet ar re a bae o skodenn d'ar Radio. Ha Barr-Heol a ro d'e lennerien un ali dic'hortoz a-walc'h : mar ne deo ket diskleriet ho post, hen grit buan ! Ar stourm ne daio ket hep poan na trouz. Ha buan e vo roet, marteze, un ali kontrol-bev : Tremenit hep paeañ ho skodenn mar ne vez ket klevet gwelloc'h Radio-Kimerc'h blas d'ar brezhoneg.

24.7.55

()()()()

YANN-VARI PERROT

An 12 a viz Kerdu 1943 e oa. Person Skrignag, an Ao. Yann-Vari Perrot a zistroe d'e bresbitoar goude bezañ lavaret an oferenn e chapel Sant-Kaourintin. An deiz-se just en em gave gouel ar sant-se a oa bet kentañ eskob Kemper. Person Skrignag a lavare e chapeled. Setu ar pezh a zo bet kontet gant ur c'holist bihan a rae hent asamblez gantañ.

War ar c'hleuz e sav un den gant ur bistolenn en e zorn. Daou denn. Person Skrignag a gouez war an douar leun a wad. D'an noz e varvo hep bezañ adkavet e anaoudegezh.

Buhez an Ao. Perrot a zo bet ur stourm penn da benn. Ur stourm kalet ouzh-penn, kaset war-raok bemdeiz hep termal. Evit hen krediñ ez eo ret lenn e vuhez a zo bet skrivet nevez 'zo gant'ur beleg eus Roazhon, an Ao. Poisson. Pa seller ouzh taolenn al levr e chomer souezhet-mik dirak labour an Ao. Perrot. N'eo ket bet hepken krouer ar Bleun-Brûg, ha kement-se a vefe bet a-walc'h evit leuniañ buhez un den dreist-ordinal. Bet eo ivez ur c'hure hag ur person gredus, un ad-saver chapelioù, rener ar gazetenn "Feiz ha Breiz" e-pad 40 vloaz, hag aozer "Buhez ar Sent".

Ar gomz-mañ a zeue alies war e vuzelloù : "ret eo dimp stourm gant armoù ar sklêrijenn, ar wirionez hag ar bedenn". Ar Wirionez a oa evitañ ar relijion gristen da brezeg, met ivez droajoù hor bro Vreizh da zifenn. Gwelout a rae endro dezhañ labour fall ar skolioù digristen ha divrezhonek hag an doareoù-bevañ a glasked lakaat war gein ar Vretoned. Eñ n'helle ket chom diseblant dirak an torfejoù-se.

Ur wech ez on bet e Sant-Nouga, parrez kentañ an Ao. Perrot. Duzh dor ar vered e c'houlennis digant ur plac'h kozh : "Daoust ha soñj hoc'h eus eus an Ao. Perrot ? - An Ao. Perrot, emezi, o ya, hennezh a oa ur beleg fur." Ha gouzout a ran, kement hini en deus anavezet anezhañ a-dost a lavarfe kemend-all. Marvet eo bet evel ur soudard mat, e armoù gantañ etre e zaouarn : goude bezañ lavaret e oferenn hag en ul lavarout e chapeled.

31.7.55

()()()()

DIR - NA - DOR

Ma lennerien, moarvat ez eus unan bennak, a zo krog da c'houlenn pelec'h e chom Herve Konan ? pe skuizh pe varv ez eo ? A-drugarez Doue ! nag an eil nag egile ! met bet eo e-pad ar vakansoù oc'h avel e benn ha distro d'ar gêr e kav diaes adkregiñ gant e bluenn.

Met an dro-mañ n'hell ken chom mut. Dirazan eo bet kontet hag enoret buhez ar stourmer kozh Dir-Na-Dor, Erwan ar Moal, eus Koadou, skrivagner brudet "Pipi Gonto" ha pennrener kozh ar c'hazetennoù "Arvorig" ha "Breiz".

An hini a vije bet diskennet disadorn, dre helikopter, war blasenn Itron Varia Bodfo e Boulvriag, en dije goulennet outañ e-unan hag-efi n'en doa ket dirazañ un daolenn eus an amzer dremenet pe ur weledigezh eus ur bed all : ur c'hant bennak a dud bodet evit enoriñ e brezhoneg ur skrivagner brezhonek ! Daoust ha plas a zo c'hoazh war an douar-mañ evit an huñvreerien a glask difenn ar pezh a ra kaerder an den dirak Doue : ar frankiz evit e spered da vevañ, da greskiñ ha da vleuniañ. O tifenn an droejoù sakr-se en deus tremenet Dir-Na-Dor e vuhez hir; an droejoù-se a zifenne pa zifenne ar Brezhoneg.

Kalz a dud hiziv ne gomprenont ket talvoudegezh ar stourm-se. Evito ez eo hepken amzer gollet. Ne welont ket e reer gaou, ha gaou bras zoken, ouzh an den pa lamer digantañ ar pezh en deus graet amzer dremenet e vro, hag a dlefe sunañ evel laezh e vamm. Ha koulskoude n'eo ket hepken yaouankiz Breizh a dro kein d' an amzer dremenet he bro. Ur c'hlenved eo hag en em led dre-holl, ha ma ne stourmer ket outañ start e tago kement tra yac'h a chom c'hoazh. A-walc'h eo gwelout ar reuz a ra ar Jazz Amerikan. Nevez 'zo, milieroù a dud yaouank, jordet ha pennfollet gant ar muzik-se, o deus skoet ha distrujet, hep doujañs evit tra na den, e Pariz, Los Angeles ha Hamburg.

Salv ma lakafe an taolennoù hir-se ar Vretoned da soñjal un tamm ha da gompren ar c'hentelioù en deus roet dezho Dir-Na-Dor a-hed e vuhez hir.

20.11.55

()()()()

G U Y R O P A R T Z

Ha pa vefe kozh un den, e chomer souezhet dalc'hmat pa glevet e vez marv. Kement-se a zo c'hoarvezet ganin p'em eus lennet war ar journal e oa aet Guy Ropartz d'an anaon, d'an oad a 91 bloaz.

Ne gomzin ket deoc'h eus ar muzisian. N'em eus ket bet tro da glevout e oberoù. Ha neuze ha p'em bije selaouet anezho meur a wech, n'en em santfen ket barrek da gomz diwar o fenn. Met tud a vicher o deus meulet anezho. Setu perak e tleomp-ni, Bretoned, kaout lorc'h eus Guy Ropartz, ha bezañ anaoudek en e genver. Kaset en deus brud hor bro d'ober tro ar bed, ha roet da anaout zoken buhez pobl Vreizh hag he sonioù.

Karout a rafen komz eus an den hag ar c'hristen. Pa oan yaouank e plije din mont da Vrec'heg war ar sul. D'an oferenn ez aen neuze da iliz Sant-Loup. Ouzh an harmonium e weled bep tro ur paotr kozh. Sofij am eus bezañ gwelet, ur wech da vihanañ, touristed oc'h ober goap eus e varvenn hir. Eveldon e oant. Ne oant ket barrek da danva ar muzik a glevet. Ne ouient ket ouzhpenn e oa dirake ar Mestr Guy Ropartz. Kement-se a ouien da vihanañ, hag e selaouen hag e sellen ouzh ar Mestr gant doujañs vras.

Diwezhatoc'h em eus bet tro da welout ar muzisian tostoc'h, ha zoken da saludañ anezhañ. D'ar mare-se ne c'hoarie ken en iliz-parrez. Re gozh en em gave : etre 80 ha 85 e oa. Deiz a-raok gouel ar Werc'hez da hanter-eost e oa. Diskennet e oan bet da Sant-Loup da rentañ ur servij bennak d'an Aotrou Person ha chomet e oan bet da verennañ gantañ. E oamp o paouez kuitaat an daol, pa zeuas en ti un den kozh, kromm un tamm, abaf ha ponnerglev. Warlorc'h an Aotrou Person ez eas er sal-debriñ. Ar mestr a oa deut da gofesaat evel prp kristen mat ar barrez.

Meur a wech ec'h on bet tremen e dirak porrastell e gastell, ha biskoazh n'em eus bet kredet antren. Keuz bras am eus bremañ. Ur wech e welis leun a weturioù kaer en allez vras. Un tamm gouel a zo emichañs gant an Aotrou Ropartz, evel ma lavar tud ar vro. Ur gouel bras en gwirionez ! Aotrounez vras eus Breizh a-bezh, hag eus Pariz, a oa deut da brofañ d'ar Mestr e gleze akademisian.

D'ar meurzh 22 a viz du ez on tremenet ur wech ouzhpenn dirak kastell Sant-Loup. Evel kustum e oa digor ar porrastell, hag an allez vras a oa goullto ha didud. An deiz war-lerc'h hepken em boa klevet e oa aet ar Mestr d'an Anaon. Pebezh kerseenn evidon. N'on ket bet o lavarout ma fater nag en interamant. Bep tro ma 'c'hin da Sant-Loup e c'hellin da vihanañ mont da zaoulinañ war e vez, peogwir en deus fellet dezhañ diskuizhañ e gousk diwezhañ e skeud unan eus bravañ ilizoù ar vro.

D A O U R O M A N T

"Itinéraire de Karl Marx à Jésus-Christ" a zo titl ul levr embannet nevez 'zo gant Ignace Lepp. An den-mañ a zegas da soñj dimp eus Melkisedek. Komz a ra eus e dad hag e vamm, met ne lavar ket eus peseurt bro e oant. Evel Melkisedek ez eo beleg ivez. Kontañ a ra en e levr istor e c'halvidigezh. E penn kentañ hag e dibenn e enklask war-lerc'h ar wirionez e kaver daou romant

An hini kentañ a oa "Ar Vamm" gant ar Russian Gorki. Klask a ra al levr-mañ livañ ar stourm renet gant ur vamm hag he mab evit diskar galloud ar Tzared ha dispenn fallagriezhoù o gouarnamant. Al lennadenn-se a zigoras e zaoulagad d'ar paotr yaouank 15 bloaz, mab ur familh armateurien binvidik ha direlijion. Hep dale e vo ezel eus ar "Yaouankizoù Komunist". Kuitaat a ray e di hag e vro evit echuiñ evel profesor e Skol-Veur Tiflis, e-kreiz menezioù ar C'haokaz.

Ha tamm-ha-tamm e teuio da gompren n'eo ket ar Gomunistiez ar pezh en doa kredet betek neuze. Ar wirionez ne oa ket ken kaer hag an hufvire : profiterien dre-holl : tud a-vil-vern gwallgaset; speredoù hualet, hep gallout lavarout netra nemet ar pezh a oa ar wirionez ofisiel.

Heugot e tistroio da Bariz evit ren e-pad ur pennad ur vuhez a zizurzh. Un nozvezh, goude un abadenn blijadur, da 3 eur eus ar beure e kouezho war "Quo Vadis", levr brudet ar Poloniad Sienkewicz. En doare-se e ra anaoudegezh gant bloavezhioù kentañ ar relijion gristen e kêr Roma, en amzer Sant Pêr hag an impalaer Neron. E galon a zo gonezet gant ar gelennadurezh-se hag a oa dianav dezhañ.

Gwelout a reer mat e buhez Ignace Lepp daou gornvro; ha war pep hini anê, ur romant. Kement-se a zegas da soñj dimp eus talvoudegezh al lennegezh, n'eo ket hepken war dachenn ar gaerder, met c'hoazh war dachenn ar vuhez. Nevez 'zo Eskibien an Alamagn o deus graet un diskleriadur diwar-benn al levrioù, hañval a-walc'h ouzh an hini a oa bet graet un nebeut mizioù a-raok gant Eskibien ar Frañs. Meuliñ a reont romantoù a glask taolenniñ an den hag ar pezh a ra e vuhez en un doare realist a-walc'h. Ur seurt lennegezh evel just n'eo ket diriskl, arabat mont re bell ganti. Ar skrivagner katolik a dle gouzout ober an diforc'h etre an onestiz hag an dizonestiz. N'eo ket a-walc'h dezhañ kennebeut diagnostikañ kleñvedoù e amzer, ret eo dezhañ klask gwellaat anê.

Dre an daou benn eta ez eo stag ar romant ouzh ar vuhez. Un doare eskemm a zo etre ar romant hag ar vuhez. Met n'eus forzh penaos, evidon-me da vihanañ, ar romant gwellañ a vo dalc'hmat an hini a ro dimp un tamm eus ar vuhez wirion evel levr an Tad Ignace Lepp.

1.1.55

() () () ()

(1) E ti Aubier, Pariz.

(2) "La Documentation Catholique", 11.12.55

U N N E V E Z I N T I V A T

Emañ Komite Bleun-Brug Eskopti Sant-Brieg o paouez krouiñ ur priz a 10.000 lur a vo lodennet etre an div skol gristen a ra ar muiañ war-dro ar brezhoneg. Ar Priz nevez a vo roet dezhañ anv ar skrivagner tregeriat Dir-Na-Dor. Ar c'helou-se a vo degemeret mat gant ar skolioù ha mignoned ar Brezhoneg.

Adtapet em eus diwar lanced ma levraoueg niverenn mezheven 1955 eus "Barr-Heol" a zispleg al labour a zo bet graet gant ar Bleun-Brug en hon eskopti. Ul lodenn eus al labour, a dlefen lavarout, rak ar pennad-se ne gomz ket eus an 10 beleg o deus vizitet ar skolioù, 115 anezho, nag eus ar skolioù n'o doa ket gallet evit abeg pe abeg kas bugale da ouelioù Pleuvihan pe Gallag. Ugent skol o doa kaset 283 bugel da Bleuvihan; hag ugent all, paz ar memes re, o doa kaset 272 bugel da Gallag. Kement-se a zo kalz; ma vije muioc'h, ne vije ket aes ober war o zro. Ha koulskoude kement-se a zo nebeut zoken pa soñjer ez eus bet a-boan ur skol diwar bemp o tont d'ar Bleun-Brug. Hag al labour graet gant ar Bleun-Brug a zo nebeut a dra pa soñjer el labour spontus a zo da gas da benn evit reiñ d'ar brezhoneg ar plas a zo dleet dezhañ e buhez ar vro.

Nevez 'zo e lennen war "La Croix" ur pennad diwar-benn 40 Rusian bihan divroet d'ar Brazil, argaset eus o bro. Lojet ha bevet e vezont en un teatr a zo bet adkempennet evite, met heuilh a reont a'vat skolioù ar gêr. Desket eo bet dezhe en doare-se yezh o bro nevez, ar Portugaleg. Aes e vije bet ober d'ar vugale yaouank-se ankouaat o bro gozh hag he yezh. An dud a ra war o zro o deus kavet ne vije ket fur ober kement-se. Yezh an ti-pansion a zo ar Rusianeg. Bep beure ha bep noz e vez lavaret ar pedennoù e Rusianeg. Bemdeiz e vez lennet dezhe ur pennad bennak diwar-benn o bro. Ortodoksed eo ar Rusianed. An Ortodoksed a gred e kement tra a gred ar Gatoliked nemet e galloud Hon Tad Santel Ar Pab, aes e vije bet lakaat ar vugale-se da chanj relijion. Ne vije ket bet tur hen ober. Bep sul e vezont kaset d'an ofis ort doks. Diwezhaoc'h, pa vezint bras, e c'hellint dibab, ha bezañ degemeret en Iliz Katolik Roman. Setu an doujañs a vager er Brazil evit speredoù hag eneoù ar Rusianed vihan.

Siwazh, n'heller ket lavarout e kaver doujañs e skolioù Breizh zoken evit speredoù hag eneoù ar Vretoned. Ger ebet eus istor ar Vro; ger brezhonek ebet. Hag evel-se istor Loeiz XIV ha Napoleon en deus kemeret plas buhez ar sent. Ar chansonioù gallek, ar re sotañ alies, a ganer e-lec'h ar c'hanaouennoù dudius a lakae an dud kozh da zañsal, da c'hoarzhin ha da ouelañ. N'eus ken a vammoù-kozh evit displegañ rimadelloù ha kontadennoù d'o bugale-vihan e-pad eurvezhioù. Embannoù-kofivers Radio-Luxembourg a zo bremañ o brasañ diduamant. Pa vint brasoc'h

e kavint c' flijadur en elkool. N'o devo ket sklerijenn a-walc'h en o spered, na tan en o c'halon evit difenn o interest zoken. Lonket e vint tamm-ha-tamm gant trustoù Pariz, na reont ket foutre-kaer eus ar Vretoned, nemet p'o devez ezhomm eus soudarded pe eus mitizhien. Hag ar reuz a zo bremañ dindan hon daou-lagad. Breizh a zo o vervel. Ar Frañs a zo o vervel. Lezel a ra hec'h izili da goll o gwad, an eil war-lerc'h egile.

Labcur ar Bleun-Brug a zo eilpenañ ar vazh. Hag evit se kregiñ dre an diazez. Sklerijennañ ha stummañ ar vistri-skol evit m'hor bo Bretoned yac'h a gorf, a spered hag a galon, leun a garantez evit amzer-dremenet o bro, ha leun a fiziañs en hec'h amzer-da-zont. An eil a ya da heul egile. Ul labour tenn : met an dever eo, ha n'heller ket tec'hout diwar an dever.

29.1.55

()()()()

KELEIER EUS HOLLAND

E-keit ha m'emañ Gouarnamant Pariz o klask pemp troad d'ar maout en Aljeria - ne welan ket kaer penaos e teuje a-benn da lakaat an Europiz hag ar Vuzulmaned d'en em glevout, siwazh, - he deus kavet Bro-Holland un diskoulm da gudennoù ar yezh e Friz. Ar vro vihan-se a zo er penn all d'an Holland, en tu all d'Amsterdam ha da chaoser vras ar Zuiderzee. N'eo ket brasoc'h eget un hanter eus departamant ar C'hôtes-du-Nord. Ha kontañ a ra war-dro 500.000 a dud. Evel Bro-Holland a-bezh ez eo brudet Bro-Friz, evit he chaoserioù a-hed ar mor, he milinoù-avel a zo o labour disec'haf an douar, he feurmioù koant ha naet, he brikennoù ruz pe velen. Brudetoc'h ez eo c'hoazh evit he saout du ha gwenn, a zo anavezet dre ar bed a-bezh; e Bro-Saoz em boa graet anaoudegezh gante evit ar wech kentañ. Duzhpenn se he deus ar chañs - pe an dicheañs - da gaout ur yezh dezhi hec'h-unan. Ar Frizeg a zo ur yezh c'hermanek, dishañval diouzh an Hollandeg, met hañval a-walc'h ouzh ar Saozneg. Nevez 'zo eta ez eus bet votet div lezenn gant Parlamant La Haye a-du gant ar Frizeg.

Dre al lezenn gentañ ez eo degemeret ar Frizeg evel yezh ofisiel el lezioù-barn. Adalek bremañ, an dud galvet dirak an tribunelioù evel tamallerien, tamallidi, pe testoù, o devo droed da douif pe da gomz e Frizeg. Pell 'zo e oa Friziz a c'houlenne kement-se, ha meur a wech o doa graet trouz e-diavaez pe e diabarzh al lezioù-barn. Tud La Haye pe Amsterdam pa lennent seurt keleier war o journalioù a rae goap eus ar Friziz a felle dezhe kenderc'hel da gomz ur yezh vihan ha dister, d'o soñj. Met dre ober bruderezh, ha trouz zoken gwech-ha-gwech all e vezer selaouet a-benn ar fin. Ur gentel vat evidomp, Bretoned.

Al lezenn all a aotre skoliatañ ar vugale yaouank dre ar Frizeg e-pad e-tri bloaz kentañ, eus 6 da 9 bloaz eta, en ur zeskiñ dezhe Hollandeg tamm-ha-temm. Friziz a oar mat n'eus nemet gonid da dennañ eus al lezenn nevez-se. Abaoe miz Ebrel 1950, e-pad 6 vloaz eta, ez eus bet graet taolioù-esa dija, gant aotre Ministrerezh an Deskadurezh e La Haye. Ar vugale o deus pleustret ar skolioù henchañ-se a gomz, evel just, Frizeg eus an dibab, met ivez Hollandeg c'hwek, kenkoulz ha gwelloc'h alies eget hini ar vugale all. Tud a vicher, skolaerien hag ensellerien, ha zoken psikologourien, o deus studiet a-dost al labour graet er skolioù-se hag holl e veulont anezhañ.

Pa lennan ar c'heleier-se deut eus Bro-Holland, e kav din e ran un huñvre kaer : un huñvre hag a garfen gwelout o tont da wir e Breizh. Ar Brezhoneg enoret ha doujet en tribunelioù hag er skolioù. Pezh a zo posubl en ur vro vihan evel Friz, a zo muioc'h posubl c'hoazh e Breizh hag a zo zoken un tammig brasoc'h eget Holland a-bezh : Breizh = 35.000 km²; Holland = 33.000 km². Bro-Holland a oar doujañ ar relijion. Er vro-se, ar skolioù libr - katolik ha protestant - a vez skoazellet gant ar gouarnamant kement hag ar skolioù publik. Doujañ a ra ivez yezh pobl vihan Bro-Friz. Daoust hag e chomo ar Frañs war-lerc'h ?

A N I L I Z H A G A R Y E Z H O U

Techet e vefemp da grediñ, marteze, e vefe an Iliz Katolik a-du pe a-enep yezhoù 'zo. D'am soñj, an Iliz a dle bezañ, hag a zo alies a-du gant ar yezh c'henidik pep bro. Setu amañ un nebeut fedoù hag hen laka splann.

An holl hen goar : ar Galleg a ya war goazhañ dre ar bed a-bezh, zoken er broioù an tostañ d'ar Frañs. Kavet em eus bet en Alamagn, en ur gêr vihan tostik d'an Danmark, daou Italian yaouank hag en em gave nec'het-bras gant o italianeg hag o galleg. Ne oa den evit komz gante, ha ret e oa bet din ober ar jubennour. En O.N.U. e-pad ar bloavezhioù diwezhañ, e rae div vro hepken gant ar Galleg : ar Frañs ha Haïti. Meur a abeg a zo d'an diskar-se. Er Brazil, souezhus a-walc'h eo kement-se, an Iliz Katolik a zo da damall. Ar relijiuzed argaset eus ar Frañs war-lerc'h an disparti etre ar stad hag an iliz o doa savet eno skolajoù e-lec'h ma raed gant ar Galleg evit pep tra, zoken evit ar pedennoù. Urzh a zeuas avat a-berzh an eskibien dazilezel ar c'hiz-se. Difenn a rejont impli ar Galleg evit ar pedennoù hag ar sarmonioù ha tamm-ha-tamm e kouezhas e levezon.

En Italia an Nord, en Tirol, ez eus ur minorite alamanek abaoe emglev Versailles e 1919. E-pad 30 vloaz o deus stourmet a-enep gouarnamant Roma evit mirout o yezh hag o fersonelezh, ha gonit a reont an trec'h tamm-ha-tamm. Da gentañ, Prezidant ar Republik Italiat en deus anzavet e oa ar gwir gante, pan eo deut da zigeriñ ar C'hoarioù Olumpat e Cortina. D'an eil, H.T. Santel ar Pab a zo o paouez reiñ dezho un Eskob a yezh alamanek d'ober war o zro.

Er misionoù ivez e vez anvet da eskibien beleien genidik eus ar vro, ha pa ne vez ket tu d'hen ober e vez klasket beleien europat hag a oar mat ar yezhoù. Unan eus eskibien nevez Madagaskar a zo ur Breizh-Izelad hag a gomz ar Malgacheg kenkoulz hag ar Brezhoneg. Hen diskouezet mat en deus deiz e gensakridigezh. Bodet e oa en-dro dezhañ pennoù bras an enezenn. Graet en deus un tost e Galleg, ha da c'houde e Malgacheg hep diaezamant.

Hep diaezamant na tamm mezh ebet, Edouard Ollivro, tad "Picou", en deus lennet pedenn "Villette" e Brezhoneg hag e Galleg, e gouel an arzourien hag ar skrivagnerien, en Iliz-Veur Landreger. Moarvat, an holl dud a oa diredet eno a ouie holl mat ar Galleg. Met soñjet o doa penaos yezh kentañ Breizh-Izel a zo ar Brezhoneg hag e oa e blas en Iliz-Veur an deiz-se. Aotrou Person Meur Landreger en doa soñjet kement-se ivez peogwir e saludas an Aotrou 'n Eskob e Galleg hag e Brezhoneg.

An Iliz n'emañ ket a-du pe a-enep ur yezh bennak. An Iliz a glask komz d'an dud ar yezh a gomprenont. Met klask a ra ivez, hag he dever eo, lakaat an dud e pep bro, bihan pe vras, da virout o yezh, bihan pe vras. Aze emañ ar gonid gwirion evit pep pobl hag evit an Iliz ivez.

M E R C ' H E D B R E I Z H

Em c'hichen ez eus o vevañ un Dimezell gozh, krog eo en e 91 bloaz hag he deus tremenet hec'h holl yaouankiz en Amerika, 17 bloaz eus he buhez. Aet e oa bet du-hont da sikour en e di un tonton beleg en doa krouet ur barrez ha savet un iliz hag ur presbitoar e-kreiz koadoù ar Stadoù Unanet. Ha pet, ha pet misioner breizhat o deus labourer e-giz-se en Amerika ? Ha pet ha pet plac'h santel a zo aet du-hont evel misionerezed ?

Tostik a-walc'h ac'han, e Staal, e voe ganet e 1798, ar Vamm Théodore Guérin. Seurez e oa eus Urzh Providans Ruillé-sur-Loir, Sarthe. Daoust ma oa bet diazezet e Frañs da gentañ, e oa bet krouet an urzh-se koulz lavarout, gant div Vreizhadez: Zoé Rolland du Roscoat, ha Perrine-Aimée Le Cor, eus enezenn Vriad. E 1840, e voe kaset ar Vamm Théodore Guérin d'ar Stadoù-Unanet, hag e-kreiz koadoù an Indiana e krouas kouent Santez Mari ar C'hoadoù. E 1856, goude ur vuhez leun a drubuilhoù hag a labour e varvas evel ur santez. Lezel a rae war he lerc'h : 15 kouent ha 112 leanez. E 1920 Urzh Providañs a zigore misionoù e Sina. Abaoe ez eo deuet a-benn da grouiñ er vro-se un urzh ispisial evit ar Sinaadezed yaouank. N'eo ket souezhus tamm ebet eta e vefe deuet ar c'helou nevez 'zo e vije lakaet ar Vamm Théodore war renk an dud eürus.

Amerika an Nord n'he deus ket ezhomm ken eus misionerien ha misionerezed Europa. Amerika ar C'hreisteiz avat ne lavarar ket. Ha kavet e vez leanezed breizhat e pep lec'h, er skolioù izelañ evel er re uhelañ. N'eus labour ebet hag a vefe re izel pe re uhel evite pa vez graet dre garantez evit Doue. Nevez 'zo c'hoazh e komze ar journalioù eus ar Vamm Marie de l'Eucharistie Daniellou, eus Ursulinezed Montroulez hag a zo renerez ar Fakulteenn Santa Ursula, e Rio de Janeiro. War vord kaerañ pleg-mor a zo er bed ! Ar Vamm Marie de l'Eucharistie a oa ivez tanva kaerderioù ar Gresianeg kozh. Skrivet he deus levrioù-skol evit henchañ ar studierien a-vremañ war ar yezh-se. He levrioù a die bezañ aozet-mat peogwir ar vrud anezhe a zo bet aet betek ar Roue e Gresia. Degemeret en deus al leanez vreizhat en Urzh Roueel Eupolias. An deiz m'eo bet medalennet ar Vamm Marie de l'Eucharistie gant Konsul Bro-C'hres e Rio de Janeiro, he deus graet ur brezegenn da veuliñ kaerder al lennegezh c'hresianek. Meuliñ a reas dreist-holl ar pezh-c'hoari anvet "Antigon", ar plac'h yaouank a gavas gwelloc'h mervel evit disentiñ ouzh lezennoù an doueed. "N'on ket deuet, emezi, evit lodenniñ ar gasoni, met ar garantez".

Merc'hed Santel Breizh, adalek ar Vamm Théodore Guérin betek ar Vamm Marie de l'Eucharistie, a c'hellfe lavarout ivez kemend-all.

()()()()

12.3.56

SANT GALL H A N I

Nevez 'zo, Ministr Iwerzhon - Eire - en Bro-Suis en deus kinniget ur blakenn arem da gêr Sant Gall, war lenn Konstañs, hag a zoug anv ur sant iwerzhonat. War ar blakenn-se e weler ur sant all, Sant Kolumban, o veajiñ war vor, o prezeg hag o sevel ur manati. E bert-ha-berr, setu aze displeget buhez ar venec'h iwerzhonat war ar douar-bras eus ar 6vet d'an 12vet kantved.

War-dro ar bloaz 590 e kuitae Sant Kolumban manati brudet Bangor gant 12 diskibl, en o zouezh Sant Gall. Treuziñ a ray Breizh-Veur, Hanternoz ha Sav-Heol ar Frañs evit echuiñ e veaj e manati Bobbio en Nord Italia. Tu a vefe d'en em c'houlenn perak e troe a-greiz-holl ar venec'h-se da rederien-bro ? Ret eo anzav ez eus bet a-viskoazh gant ar Gelted ar c'hoant da veajiñ. Santez Katell Siena a lavare : "Dre-holl e-lec'h ma tremen an heol, e tremen ar Breizhad." Ur vuhez kozh eus Sant Gall a zispleg e oa poulzet ar venec'h-se eus o bro gant o c'harantez evit Doue hag ar c'hoant da enoriñ anezhañ : evite kuitaat e vao a oa un doare pinijenn.

Un dra a zo sur. Doue a c'uezo en em servijout eus pleg ar Gelted d'ar beajoù evit prezeg e Aviel d'ar pobladoù pagan pe digristenaet. Kement-se a vezo dreist-holl labour Sant Gall a seblante bezañ barrek war ar yezhoù. Ar Gelted a-vremañ, a zo chomet feal d'ar c'halvidigezh-se. Gwelet em eus ur wach e porzh-mor Dublin, ur strollad beleien yaouank hag a oa o vont da gemer al lestr evit ar misionoù. Tud bev ha laouen-kenan e oant. Kement hini en deus beajet un tamm a wel mat anef an Iliz Katolik en Breizh-Veur hag er Stadoù-Unanet dindan levezon speredel Iwerzhon. Labour Breizh war an dachenn-se a zo disteroch, sur mat ? Met nerzhioù kristen Breizh a zo sunet gant ar stourm a rank ren evit mixout bev ar Feiz er he c'hreiz. H.T.S. ar Pab a oar mat kement-se. D'ur mignon din hag en doa bet an enor da gomz gantañ, a lavare n'eus ket pell : "Chomit stag e Breizh ouzh ho skolioù kristen !"

Ar venec'h iwerzhonat a-wechall o doa savet manatioù diniver war an douar bras hag a zo bet ivez skolioù bras an amzer. A-walc'h eo lavarout anvioù Luxeuil, Sant-Gall ha Bobbio. E Sant-Galle virer darn eus koshañ skridoù ar yezh iwerzhonek. Ar venec'h-se o deus poaniet ivez da adskrivañ levrioù kozh ar C'hresciened hag ar Romaned, a vije aet da goli hepze, moarvat. Ha hepze, moarvat, ne vije bet biskoazh ar pezh a anvomp "Renaissance", an Azginivelezh. Romantoù ar Roue Arzur hag an Daol-Grenn a oa bet krouet gant Bretoned Breizh-Veur. Kontet e oant bet d'ar Franzizien gant Bretoned Breizh-Vihan. Evelse Iwerzhon ha Breizh a zo bet er Grenn-Amzer div vammenn a studi hag a gaerder. An div vammenn-se n'int ket da hesk. O "Azginivelezh" a zeu ivez.

En amzer-da-zont, evel gwechall, e vo gwelet c'hoazh Breizhiz hag Iwerzhoniz o vont da vale dre ar bed da zisplegañ d'an dud kaerder ar grouadelezh, talvoudgezh ar vuhez ha karantez Doue.

19.3.56

()()()()

DEVEZHIOU - STUDI E PLOUEG - AR - MOR

E-pad vakansoù Pask ar bloaz-mañ hon eus gwelet bodadegoù ha devezhioù-studi a bep seurt un tamm dre-holl. An eurvad am eus bet da heuilh penn-da-benn an devezhioù-studi a oa bet aozet gant ar gazetenn pedagogel "Skol" e Ploueg-ar-Mor, du-hont e Bro-Ouelou. Kavet em eus bet eno 34 a dud, en o zouezh 16 kelenner pe skolaer ha 11 a gerent, al lodenn vrasañ anezho eus Ploueg. Hag en gwirionez talvezout a rae ar boan mont di, ken en abeg d'an danvezioù studiet, ken en abeg da ampartiz ar gonferanserien.

An Ao. Loeiz ar Floc'h, aluzenner Skol Sant-Pêr e Sant-Brieg, a gomzas dimp diwar-benn talvoudegezh ar C'hultur evit buhez an den hag e Relijion. Ya, "ar Brezhoneg hag ar Feiz a zo c'hoazh Breur ha C'hoar e Breizh". Dimp da gompren. Pep bro, pep pobl he deus un doare dezhi hec'h-unan da vevañ ha da zisplegañ he soñjoù hag he santimanchoù dre oberoù an arz : an tier hag an ilizoù, ar statuoù hag an taolenoù, ar muzik hag an dansoù. Siwazh, an deiz an hiziv e weler ar C'hultur o vont war gwazhañ en Breizh ha dre ar Bed a-bezh. Pouezañ a reas kalz ar prezeger war ar sioù fall a zeu da gement-se : pobloù dinerzhet ha digalonekaet, en em daol d'an alkool, pe a glask divroañ hep ezhomm. An divroañ n'eo ket hepken ur gudenn ekonomikel, met bez' ez eo ivez ur gudenn psikologikel. Betek-hen e oa bet kuzhet ar wirionez-se ouzhimp. Dav e vo dimp soñjal warni ha labourat !

Ret eo kregiñ gant ar skol. Setu aze ur gudenn ha n'eo ket aes da ziluziañ ! A gav deoc'h moarvat ? Mar vijec'h bet o selaou an Ao. Kalvez, rener skol Sant-Erwan e Ploueg, ne lavarjec'h ket se. An Ao. Kalvez en deus baleet kalz dre Europa ha tro en deus bet da studiañ kudenn ar skolioù er broioù bihan : e Kembre (Breizh-Veur); e Friz (Bro-Holland); er Slesvig (Alamagn). O kemer skouer diwar ar pezh en deus gwelet du-hont, e tisplegas brav ha sklaer penaos e vije tu da zeskiñ da vugale Vreizh-Izel lenn, skrivañ ha kontañ dre ar Brezhoneg ha da zeskiñ dezho tamm ha tamm ur galleg reizh ha c'hwek. Ar vugale-se a vije ken desket hag ar re all war gement o defe ezhomm evit bevañ. Muioc'h desket zoken, peogwir e ouijent div yezh, ha peogwir c'hoazh o dije muioc'h a aezamant da zeskiñ yezhoù all diwezhatoc'h, ar saozneg pe an alamaneg. Warlerc'h ur profesion a feiz ken sklaer ha ken didroidell - ha ken kalonek, ret eo hen anzav - e voe roet da bep hini frankiz da zisplegañ e soñj. Ne oa bet den avat evit dislavarout an Aotrou Kalvez. Kement-se a ziskouez e oa bet studiet mat ar gudenn gant an Ao. Kalvez, hag ez eo prest tud 'zo e Breizh-Izel da zegemer doareoù-skoliata nevez gant ma vo kinniget dezho un dra bennak sirius.

Devezhioù-studi "Skol" o deus skuilhet e Breizh un hadenn brizius. Diwan a ray sur-mat, ha hep dale, marteze. Diaes eo dimp avat lavarout c'hoazh pegen kaer e vo ar frouezh a savo diwarni.

15.4.56

()()()()

D I V R O E T

Ar sizhun ziwezhañ, Pardon Sant Erwan en doa roet tro da unan eus kel-
souennoù bras Pariz da gomz eus ar 500.000 Bretoni divroet eno, hag o c'hud-
ennoù relijiel.

Pa zivro un den da vat, gwellañ tra en deus d'ober moarvat eo klask en
em ober ouzh e vuhez nevez, n'eo ket hepken en ur gemer doareoù-bevañ, met
ivez dre glask kompren ar pezh a ra kultur e vro nevez. Da vihanañ pa' z eus
unan; pezh na c'hoarvez ket atav.

N'eus forzh penaos n'eo ket yac'h, nag evit ar spered, nag evit ar galon,
nag evit an ene, dilezel a-daol-tranch ar vro gozh. Setu perak e labour kement
ar Mision Breizhek e Pariz da virout bev e-touezh an divroidi gizioù ar vro, ar
gwiskamanchoù, ha zoken ar yezh. Met kement-se, hervez ar gazetenn a gomzen
diouti uheloc'h, n'eo nemet ur bazenn er skeul o deus da bignat ganti. Un deiz
e vo ret dezho, pe d'o bugale, en em veskañ da vat gant poblañs Pariz, da lav-
arout eo gant tud divroet eus pevar c'horn ar Frañs, hag eus an Afrik ! peogwir
90% eus ar "Barizianed" n'int ket ganet e Pariz. Ar c'hêrioù bras a zo debrer-
ien-dud. Ret e vefe eta d'ar Vretoned dilezel ar pezh a ra anezho Bretoned;
tud an Aovergn a ray kemend-all; tud Flandrez ivez; hag e-giz-se e vo krouet
rummadoù nevez Parizianed disheñvel hepken dre o anvioù-familh.

Met petra a ginniger d'an dud baour-se evit o digoll ? Evel just ar
sinema hag an television. N'eo ket ret mont da Bariz evit o gwelout. Met netra
eus ar pezh a ra d'ur bobl santout ez eo ur bobl, hag ur bobl kristen.

Pezh a c'hoarvez e Pariz a c'hoarvez ivez en Amerika. Da gentañ ez eus
bet graet pep tra eno evit mirout en divroidi karantez e bro c'henidik. A-walc'h
e vo din lavarout n'eus bet betek-hen kelaouenn gatolik ebet e saozneg - yezh
ofisiel ar vro - pa 'z eus meur a hini e poloneg, en Alamaneg, pe c'hoazh en
Italianeg. Hag ar gatoligiezh en Amerika a zo nerzhus. Ar gatholiked a zo chomet
stag ouzh o skolioù kristen, ouzh o ilizoù hag ouzh o yezhoù. Ar rummadoù nevez
ne gomzont ken avat yezh o zadoù kozh; en em zistagañ a reont ivez diouzh ar
Feiz; tamm-ta-tamm e teuont da vevañ diwar an atmosfer pagan silet enne gant ar
Saozneg. Kement-se a zo bet displeget nevez 'zo gant studiadennoù a Sosiologiezh
Relijiell.

War an tu all d'ar Mor Atlantel, e kaver, er C'hameroun, unan eus gwellañ
broioù katolik Afrika. Met pa zeu ar Vorianed da vevañ er c'hêrioù bras e kollont
o feiz gant o gizioù kristen. Pe gentoc'h dre n'o deus ket a-walc'h c'hoazh a
c'hizioù kristen; ar relijion n'eo ket aet don a-walc'h en o buhez evit bezân

barrek da grouiñ ur c'hultur kristen. Ha tamm-ha-tamm ar vuhez pagan modern, pe gozh, a grign o feiz, evel ar mor an douar gwak. Klasket e vez un diskoulm d'ar gudenn. E Douala, da skouer, e vez bodet ar gristenien hervez o yezh, pe gentoc'h o dialekt.

War ar gudenn-se ivez Stadoù Unanet Amerika n'o deus ket lavaret o ger diwezhañ. Muioc'n-mui e vez kelennet ar Galleg el Louisiana, ar Spagnoleg a-hed ar Meksik, an Alamaneg en-dro da Chicago. Ar Saozneg a chomo sur-mat ar yezh federal, met ar yezhoù all a yelo ivez war grefvaat, betek dont da vezañ marteze yezhoù ofisiel e hini pe hini eus ar Stadoù. Kement-se ne vihanafe ket nerzh ar Stadoù Unanet, met krefvaat an nerzh-se dre grefvaat buhez ar spered hag an ene e pep stad.

Ur fazi eo lakaat sperejoù an dud da blegañ da reolennoù strizh, ha pa vefent bet savet gant speredekañ pobl an douar a zo, an holl hen goar dre ar bed, hini ar Franzizien. Ar reolennoù, hag ar reolennoù eo a dle plegañ da ezhommoù an dud. Evit bezañ ankounac'haet kement-se hon eus bet brezel Indez-Sina, hag hon eus hiziv hini Aljeria.

2.6.56

(())(())

A R B. E. P. C.

Ur bloavezh e tremen vakansoù sioul e Bro-Gembre. Bep noz avat e teue ar c'hwibu da grafignat din ma zammig kroc'hen adalek ma klasken digerifi ul levr em gwele. Hag e teuas da soñj din eus ar boultrenn vuzhudus-se, pe gentoc'h lazhus, hag a zo marv an holl amprevaned : an D.T.T. evel ma lavaromp e Brezhoneg hag e Galleg. Den ebet ac'hanomp moarvat n'hellfe lavarout petra a dalvez an teir lizherenn-se, hag en gwirionez n'hon eus ket ezhomm da c'houzout. Ha me da di an apotiker ha da zistagañ an teir lizherenn e giz ar Saozon : Di Ti Ti. Ar paotr a gomprenas raktal hag a servijas din ar varc'hadourezh goulennet.

E pep yezh e kaver gerioù nevez stummet gant ar penn-lizherennoù. Moarvat e vije nec'het al lodenn vrasañ eus an dud ma vije goulennet diganto displegañ war o hed gerioù evel B.E.P.C. : C.E.L.I.B.; hep komz eus R.A.D.A.R. hag S.O.S. Kement-se tout evit displegañ deoc'h, brezhonegerien, hoc'h eus ar gwir d'ober gant ar gerioù-se kerkoulz ha n'eus forzh piv, hep ma vije tamallet deoc'h bezañ o laerezh madoù ar re all.

Eus ar B.E.P.C. e fell din komz. Anavezout a ran du-hont e kostez Landreger ur plac'hig vihan koant hag he deus tremenet gant berzh an arnodenn-se. Evit an amrouenn dre gomz he doa dibabet ar brezhoneg. An arnodenner o welout e oa eus Bro-Dreger a c'houlennas diganti hag anavezout a rae Jarl Priel. Ma oa bet souezhet an hini vihan gant ur seurt goulenn, e voe souezhet brasoc'h c'hoazh an arnodenner gant ar respont, a zeuas er-maez evel tenn : "Ya ! emezi, e anaout e ran kerkoulz ha n'eus forzh piv, peogwir ez eo ma zad-kozh !" Hag o-daou da c'hoarzhin ha da varvailhat diwar-benn oberoù Jarl Priel : pezhioù-c'hoari hag envorennoù. Ha ma oa bet gwasket betek neuze kalon ar plac'hig, e frankaas warni. Un notenn vat a dapas, 18 diwar 20. Hervez, ouzhpenn eus an hanter eus ar poentoù a oa ezhomm evit bezañ degemeret. Ha moarvat - kement-mañ a iji an me va-unan - en dije roet an arnodenner 20 dez , rak desket an doa meur a dra diganti diwar-benn Jarl Priel : penaos e oa kont gant e yec'hed, penaos e tremene e amzer vak, al levrioù a blije dezhañ, an oberoù emañ o skrivañ, ha me 'oar me. Met n'emañ ket ar c'hiz d'ar skolidi da vezañ muioc'h desket eget o mistri.

Pezh a zo c'hoarvezet gant merc'h vihan Jarl Priel, a c'hell c'hoarvezout gant ar vrezhonegerien yaouank hag a zibab ar Brezhoneg evit ar B.E.P.C. pe ar Vacherlouriezh. Peurvuiñ e vez hiroc'h o deskamant war o yezh eget hini ar re a studi an Alamaneg pe ar Spagnoleg. Moarvat ne zistroint ket holl d'ar ger gant an 18, met kalz gant ur 14 pe ur 15. Ha neuze klevout un tamm Brezhoneg deiz un ekzamin a zo a-walc'h evit dizoaniañ kalon un den. Ur reder-bro a lavaras un deiz d'am mamm a oa bet spontet gantañ : Me n'on ket drouk, me a gomz brezhoneg evel doc'h !

Hag holl e c'hellint distreiñ d'ar gêr neuze en ul lavarout : O.K. !
(Distagit evel ma kerot !)

22.7.56

()()()()

" JOERGENSEN "

Gwechall em boa ul levr hag a oa anvet "Sant Fransez Asizi", gant Joergensen. Prestet e oa bet ganin d'ur mignon, ha n'eo ket bet rentet din, siwazh ! Mar em bije graet evel ur person kozh eus va anaoudegezh ne vije ket bet c'hoarvezet an dro-se ganin moarvat. Pa breste ul levr bennak e poke dalc'hmat dezhañ en ul lavarout gant karantez : "Kenavo". Hag an amprester, feuket un tammig, a rente atav al levr.

C'hoant am bije bet da adlenn oberenn Joergensen. Da geñver e varv, degouezhet un nebeut 'zo, ez eus bet komzet kalz anezhañ er journalioù katolik. A-raok se em boa klebet e genvroiz o veuliñ anezhañ e-pad an hañv diwezhañ pa oan en Danmark. Pezh a oa souezhus a-walc'h evidon, da gentañ da vihanañ. Tud an Danmark a zo kazi holl protestanted ha Joergensen a oa katolik. Met Joergensen a oa da gentañ un Danad. E anv hen diskouez sklaer. Ar silabenn "sen" (son e Saozneg) a dalvez kement ha mab. Joergensen a zo eta : "mab da Joergen". Ne oa ket hepken un Danad dre an anv - pezh a c'hellfe bezañ nebeut a dra - chomet e oa ivez Danad dre ar spered hag ar galon. Skrivet en doa e holl levrioù e yezh e vro, hag a zo ur vro vihan, dezhi 4 milion a dud hepken. Un tammig brasoc'h eget Breizh eta. Joergensen en doa beajet kalz, ha gallet en defe skrivañ e Saozneg, Alamaneg Italianeg pe Galleg. Ha neuze e vije bet sellet evel ur Saoz, un Alaman, un Italian pe ur Gall. Kollet e vije bet evit e vro, hag ar pezh a zo gwasoc'h evit ar relijion gatolik en e vro.

E Bro-Danmark ez eus nebeut-kaer a gatoliked : war-dro 30.000, hag a zo o vevañ al lodenn vrasañ anezho er c'hêrioù bras evel Copenhagen. Un eskob danat a zo bremañ, met kalz eus ar veleien hag ar relijiuzed a zo estranjourien. Skolioù katolik a zo ivez, ha skoazellet e vezont gant yalc'h ar gouarnamant, kalz maic'h eget ar skolioù katolik er Frañs. Daoust da se ne gresk ket buan an Iliz Katolik en Danmark. Meur a abeg a zo war se. Disfiziañs o deus an dud ouzh ar gatoligiezh. N'o deus ket ankounac'haet brezelioù ar relijion, na dreist-holl an diaezamantoù o deus ar brotestanted da c'houzañv e broioù katolik evel ar Spagn. War ar maez n'o deus ket gwelet an dud ur c'hatolik ur wech en o buhez. Diouizieki ez int eta war bep tra. An dud desket zoken n'anavezont mann ebet koulz lavarout. N'ouzont ket, da skouer, e chom dizimez ar veleien gatolik. Ar re o deus baleet er broioù katolik evel Alamagn ar c'hreisteiz, Ar Frañs, pe Italia, a zo bet sabatuet gant al latin ha muioc'h c'hoazh gant stad warlerc'hiet an dud e kêr ha war ar maez. (Arabat ankounac'haet ez eo an Danmark unan eus ar broioù modernañ eus ar bed, daoust ma 'z eo unan eus ar re vihanañ !) N'eo ket souezhus eta e teufe Daniz da soñjal ez eo graet ar gatoligiezh evit tud ar c'hreisteiz hag ar brotestantiezh evit tud an Hanternoz.

N'eo ket an estranjourien a ziskaro ar soñjoù faos-se er speredoù. Met Daniz katolik int o-unan. Levrioù evel re Joergensen a c'hell en em silañ dre-holl. Doujet eo gant an holl. Ha peadra zo da vezañ. Met, pezh a zo kaeroc'h c'hoazh, karet ez eo ivez. Joergensen en deus tremenet ul lodenn vat eus e vuhez en Asizi. Stad an Danmark a brenas e di digantañ evit ober gantañ ur muze. Deuet war an oad e fellas da Joergensen distreiñ d'e vro da gozhañ ha da vervel. Ar gouarnamant a ginnigas dezhañ mont da chom en e di kozh, er muze ! Hiziv muze Joergensen en deus kollet e vrasañ tefzor pa 'z eo marv ar skrivagner en deus enoret hag e Vro hag e Relijion. Met chom a ray bev e kalonoù e genvroiz e-pad pell.

5.8.56

()()()()

" V A Z A M M I G B U H E Z "

Ar Vretoned a anavez mat a-walc'h anv Jarl Priel, ar skrivagner pezhioù-c'hoari - "An Dakenn Dour", "Ar Vatezh Vihan" - hag ivez e benn, peogwir efi eo a rae Salaun er film "Itron Varia ar Folgoad". Betek-hen n'anavezet ket kalz e vuhez. Me 'gave din en doa tremenet e vuhez o kelenn ar Galleg e Moskou pe Stalingrad hag o c'hoari teatr e Pariz gant tud vrudet evel Dulin ha Jouvot. Tamm ebet ! Graet en deus an eil hag egile, sur mat, ha meur a dra all c'hoazh, a gont Jarl Priel en e levr-envorennoù en deus anvet "Va zammig buhez".

Evel-se eo bet martolod-servij evel c'hoarier-trombon ! Tu en deus bet da vont da veur a vro, ha da welout a-dost aotrounez evel Sultan ar Maroko, Roue an Danemark, Tzar Rusia, Roue Bro-Spagn, hag ar Prezidant A. Fallières.

Jarl Priel a oar displegañ pezh en deus gwelet ha santet; gouzout a ra dreist-holl livañ an dud. O lakaat a ra, koulz lavarout, bev dirak an daoulagad. E Vrezhoneg a zo pinvidik, hep bezañ heñval ouzh ur roll-gerioù, rak dindan pep ger ez eus ur soñj nevez; e Vrezhoneg a zo bev; implij a ra troioù-lavar ar bobl hag e skeudennoù da zisplegañ ar soñjoù. Lennit, da skouer, poltredoù Alfoñs XIII hag A. Fallières : o lakaat a ra skoaz-ouzh-skoaz gant Don Kic'hote ha Sancho e vevel ! ha gant traoù all c'hoazh. E berr-ha-berr n'eus ket gwelloc'h levr evit frealziñ ar galon pa reer gwad-fall, hag evit deskiñ yezh druz Bro-Dreger.

10.4.55

() () () ()

" A R V R O "

Bernard Shaw, ar skrivagner saoznek, a bedas un deiz W. Churchill da zont da welout abadenn gentañ unan eus e bezhioù-c'hoari. "Kas a ran deoc'h, emezañ, daou vilhed : unan evidoc'h, hag unan all evit ho mignon mar hoc'h eus unan bennak !" W. Churchill ne voe ket pell o kas an dorzh d'ar gêr, ha respont a reas : "N'on ket libr da vont d'an abadenn gentañ, met mont a rin d'an eil ma vez unan !"

Pa vez lañset ur gazetenn bennak, e soñj kalz a dud : komanantiñ a rin ma vez moulet un eil niverenn. E miz Kerdu e voe embannet niverenn gentañ Ar Vro hag emañ an niverenn 4 o paouez dont er-maez. Peder fajenn he deus ar gazetenn nevez. Div bajenn skrivet e Galleg a ro pennadoù diwar-benn ar Brezhoneg hag ar pezh a vez embarnet e Brezhoneg. An deirvet bajenn a embann keleier eus ar bed a-bezh, ha war ar bedervet pajenn e kaver pennadoù diwar-benn al labour hag ar bobl e Breizh. Da skouer, en niverenn 3 e oa ur pennad plijus diwar-benn al labour-douar e Bro-Dreger aozet gant ur prezidant C.G.A., E. Ar Bourdoneg eus Bulien.

Daoust m'eo yaouank Ar Vro c'hoazh, e vez lennet betek er broioù pellañ. Setu amañ daou desteni. Anavezout a ran un Alaman, studier war al labour-douar, hag en deus gallet dont da dremen tri miz en ur feurm e Breizh a-drugarez d'ar gazetenn-se. Warni, du-hont en Alamagn, en doa kavet an adres a oa o klask.

Nevez 'zo c'hoazh, ur Breizhad yaouank, soudard er Vietnam, a gase din ul lizher hag ur chekenn evit Ar Vro. "Karout a rafen komanantiñ, emezañ. N'ouzon ket avat da biv kas arc'hant, rak n'em eus gwelet nemet un tamm eus ar gazetenn-se".

Grit c'hwi ivez evel ar Breizhad kalonek-se. Kasit diouzhtu ho komanant d'an tefizoriez hep chom da dortal. He tamm ha tamm e teuio Ar Vro da vezañ ar Gazetenn vras hon eus ezhomm anezhi evit difenn madoù ar Vretoned gant pouez ha nerzh.

10.7.55

()()()()

AR MAOUT GANT TREGERIZ

Emañ aze war ma zaol ar pemp levr brezhonek a zo bet embannet e 1955. Ha ma n'int ket niverus, e c'hellan lavarout da vihanañ ez eo ur plijadur sellout oute, rak moulet ez int bet brav war baper kaer; hag ur blijadur vrasoc'h c'hoazh ez eo lenn anezha. Pevar anezha a zo bet skrivet gant Tregeriz, hag egile gant ur C'hernevad. N'eo ket diaes eta barn ar prosez. Hag ar maout gant Tregeriz !

Saludomp da gentañ "Levr ar Furnez". Setu unan eus talvoudusañ levrioù ar Bibl lakaet e Brezhoneg gant Maodez Glanndour, unan eus hon gwellañ barzhed. Hon mignon Loeiz Ar Floc'h en deus kroget d'embann hini ha hini levrioù ar Bibl, e-giz m'o deus graet an Dominikaned evit "Bibl Jeruzalem". Ul labour hir ha tenn eo, met e feiz en amzer-da-zont ar Brezhoneg hag e garantez evit ar Skritur Sakr a drec'ho war bep diaezamant.

"Va Zammig Buhez" gant Jarl Priel, a zo anavezet bremañ e Bro-Dreger, eus an eil penn d'egile. Tout ar re o deus lakaet o fri el levr-se o deus ranket lenn anezhañ. Anavezout a ran ur beleg kozh hag en deus lennet anezhañ div wech, dre blijadur, evel just. Anavezout a ran c'hoazh un ti e-lec'h m'eo bet lennet penn-da-benn, a-vouezh uhel, evel gwechall "Buhez ar Sent".

Yeun Ar Gow, noter e Gwezeg e-kichen Kastellin, en deus nevez embannet e envorennoù yaouankiz dindan an titl : "E Skeud Tour Sant Jermen". Yeun Ar Gow, evel pep noter mat ha koustiansus, a gont dimp pep tra c'hoarvezet gantañ, evel p'en dije savet ur skrid evit Prokuror ar Republik. C'hwec'h miz 'zo em eus kroget gant al levr-se, ha n'em eus ket echuet c'hoazh. Ober a ran evel ar vugale gant o zammig bonbon sukr : ober d'ar blijadur padout. Ha neuze, ret eo din anzav, mont a ran dezhañ bep tro m'em bez ezhomm da ziverglañ ma spered ha da lemmani ma fluenn.

Takenn ha takenn ivez em eus evet an daou levr all, evel ul louzou danjerus gant aon na vije bet beuzet ma zammig kokenn en un vaol. Fellout a ra din komz eus daou levr poemoù, eus "Barzhonegoù" gant Kerverzioù, hag eus "Evidon Va-Unan", gant Ronan Huon. N'em eus ket bet an enor d'anavezout Kerverzioù a zo aet d'an anaon e 1951. Doue d'e bardono ! Anavezout mat a ran avat Ronan Huon. Uzet hon eus brag-eier war ar memes bankoù-skol. Eñ kennebeut n'eo bet beuzet en e boemoù. Eñ eo rener "Al Liamm", an dastumadenn-se hag a ra kement d'embann skridoù brezhoneg a dalvoudegezh. Ha n'it ket da grediñ en dije rostet tout e arc'hant o lakaat moulañ ul levr ken kaer hag "Evidon Va-Unan", rak nevez 'zo en deus prenet un "Dyna-Panhard" eus an diwezhañ model. Nag al levr, nag ar wetur ne reont ket mezh d'o mestr.

Me a gave din e vije bet klozet ar bloaz gant ul levr nevez aozet gant Jarl Priel : "Va Buhez e Rusia". Siwazh, ar votadegoù o deus dilerc'het al labour. Met, n'eus forzh, n'eus ket un droug ha na servijfe ket d'ur vad bennak. Seblant vat a vo evit ar Brezhoneg kregiñ en ur bloavezh nevez gant un oberenn diwar bluenn Jarl Priel.

D'AN AOTROU JARL PRIEL

War-un-dro ganeoc'h, em eus graet ur veaj betek Moskou. Hag evel ma lavare ma zintin Marivon pa vije bet o pardonañ e Lourd : kaeroc'h em eus graet c'hoazh : dont d'ar gêr ! Hir e vez ar beajoù evidon peurvuiañ, met en ho kompagnuez em eus kavet berr an amzer.

Kloukez on pa vez lakaet etre ma daouarn ul levr skrivet gant Jarl Priel. Soñjal a rae din em bije graet pemp genaouad hepken eus "Ma Buhez e Rusia", met ar pennad diwezhañ a zo hir a-walc'h ha ret eo bet din mont dezhañ teir pe beder gwech. Rankout a ran lavarout deoc'h em eus kalz a labour d'ar momed. Lennet em eus ho levr d'an noz, em gwele, pa vije aet ar vugale d'o gweleoù, ha didrouz an ti. Neuze e c'hell ma spered tanva ho prezhoneg ha heul ac'hanoc'h en holl droioù fentus pe drubuilhus c'hoarvezet ganeoc'h er broioù estren. Diaes e vefe din lavarout deoc'h pere eo d'am soñj ar pennadoù kaerañ. Ret e vefe din adlenn al levr. Pa vezan gant ul levr evit ar wech kentañ e vezan hanval ouzh ur vagig war ar ster. Mont a ra buan gant red an dour ha ne chom ket da sellout ouzh ar bleunioù koant nag ar gwez. Pa vezan krog en ul levr plijus e klaskan ivez mont war-raok ar buanañ ma c'hellan, hep chom da danva re bell ar pennadoù fromus pe skrivet bravoc'h. Koulskoude em eus taolet evezh bras ouzh an div pe deir bajenn a gont dimp an abardaez diwezhañ tremenet ganeoc'h e lanneg vras Krec'h Elies a-raok kuitaat ar vro evit Moskou. Lennet em eus ar pennad-se da vignoned din hag a zo o chom er bourg amañ. An Itron n'anavez ket mat-mat ar brezhoneg, ha troet em eus bet eviti e galleg pep frazenn. Lavaret he deus din da c'houde : Bep tro ma teuot amañ, e vo ret deoc'h lenn ha displegañ dimp ur bajenn eus "Ma Buhez e Rusia". Gwelout a rit ne rankot ket gortoz ma viot aet da Gankari, evel ma lavarit ken brav, evit gwelout ar Vretoned o lenn ho skridoù gant plijadur ha karantez. Hag ivez gant gonid. Gant ur c'hreion em dorn, em eus lennet ho levr, hag en doare-se e vo aes din adkavout ar gerioù hag an troioù-lavar a c'hello gwech an amzer pinvidikaat ma brezhoneg alies sec'h ha treut !

A-raok ho kuitaat e fellfe din ho trugarekaat eus an degemer ho poa graet din ur miz 'zo bennak. N'hellfec'h krediñ ar blijadur am boa bet oc'h ober anaoudegezh gant feunteun Soaz Sapeur, al lanneg, al liorz - leun a strouezhaj avat ! - hag ho ti war Gec'h Elies. Gant kement a garantez hoc'h eus komzet eus al lec'hioù-se e "Ma Zammig Buhez", ma kave din e raen ur pelerinaj. Plijadur am eus bet ivez o welout ac'hanoc'h hag an Itron Priel; ken sart ho-taouig hag ur c'houblad laouenaned daoust d'an oad, d'ar c'hleñved, ha da ziaesamantoù ar vuhez. N'ankounaïn biken ar c'homzoù a lavaras din an Itron Priel pa oan o kuitaat ho ti : ar vuhez a zo bet kalet evidomp, met bevet hon eus ur vuhez leun, se eo a gont !

Kenavo, Aotrou Priel. Spi am eus e kavot un tamm frealz el lizher-mañ a skriven deoc'h dre anaoudegezh vat.

12.2.56

()()()()

AR BIBL E BREZHONEG

Ar sizhun ziwezhañ e lavaren o doa Protestanted Bro-Gembre muioc'h a chafis eget ar Vretoned evel pa ne vije Bibl ebet e Brezhoneg. Ur gaou e oa, ha ne oa ket. Bez' ez eus bibloù brezhonek, met siwazh ! n'int ket ken talvoudus ha hini Bro-Gembre moulet e 1588.

Protestanted 'zo a lavar e oa bet moulet gwechall ur Bibl e Brezhoneg gant prezegennerien ar relijion nevez e Breizh-Izel. Anez se penaos o dije gallet prezeg d'ar Vrezhonegerien a oa peurlivriañ dizesk war ar Galleg ? Kement-se a c'hell bezañ, met betek-hen n'eus bet kavet roud ebet eus ur seurt levr. Pezh a zo gouezhus a-walc'h. Hag en gwirionez, ar Brotestanted n'o deus ket graet atav gant yezh ar bobl en o ofisoù. Er Slesvig e raent gant Alamaneg Uhel Luther, hag e Bro-Friz ez eo ret gortoz en 20^{et} kantved evit klevout Frizeg en ilizoù.

Ar Bibl kentañ e Brezhoneg a chom eta hini Ar Gonideg, moulet e 1866. Aozet e oa bet diwar ar "Vulgata" troidigezh ofisiel an Iliz Katolik. Ur Bibl Katolik e oa eta, daoust ma oa bet embannet hep an Imprimatur. Mankout a rae dezhi, siwazh, an nebeut notennoù a gaver dalc'hmat e traoñ pajennoù ar Bibl Katolik. Ministr an Deskadurezh hag ar Relijion en amzer-se a brenas 60 skouerenn. N'eo ket eta abaoe dec'h eo troet gouarnamant Pariz gant ar Brezhoneg ! An Ao.'n Eskob David, mignon ar Brezhoneg ivez, a glaskas brudañ labour Ar Gonideg, met a-benn ar fin, Kenvreuriezh Sakr an Index a nac'has reiñ an aotre da werzhañ al levr.

Lakaomp e vije bet roet da Vibl ar Gonideg an Imprimatur, ne dalvezfe ket kement-se da lavarout e vije bet degemeret mat gant ar veleien. Ar re-mañ a oa kustum da veskañ, hep ezhomm peurliesañ, ur bern gerioù gallek gant o brezhoneg. Yezh Ar Gonideg a oa bet c'hwennet. Ne lavaran ket e oa re c'hwennet, met bez' e oa a-wechoù c'hwennet fall. O klask bezañ pur e teu da vezañ diaes da intent amañ hag aze. Ni eveljust, Brezhonegerien an XX^{et} kantved, ne spontomp ket dirak yezh Ar Gonideg - gwelet hon eus kalz gwashoc'h ! - peogwir ar yezh-se a zo deut da vezañ diazez ar Brezhoneg skrivet. Ret eo ivez anzav ne oa ket aes bale gant Bibl Ar Gonideg. Daou levr bras tev, ponner ha landrammus.

Ar Brotestanted a glaskas ober o mad eus ar rebechoù a raed d'Ar Gonideg. E 1891 e voe embannet e Londrez gant Kevredigezh ar Bibl, un droidigezh nevez. Aozet e oa bet gant an Ao. Koad, pastor e Tremel. Siwazh, an Ao. Koad a c'hwitas war e daol. Blaz an Tregerieg a zo gant e labour. Pezh n'eo ket ur si, daoust ma kav dalc'hmat tud Leon emañ ar gwellañ Brezhoneg gante. An Ao. Koad a glask implij-out gerioù muioc'h anavezet gant ar bobl, met ne oa ket ur mestr war ar yezh evel Ar Gonideg, hag e labour a zo leun a fazioù. Koulskoude ar paper a oa tanv hag al

levr a zo aes da zougen. Kavet e vez c'hoazh da bremañ e Pariz, e Ti Ar Bibl.

A-drugarez-Doue, hag a-drugarez d'an Ao. Floc'h, eus Sant-Brieg, ha d'an Ao. Klerg eus Buhulien, ha d'un nebeut beleien all eus Treger, hor bo hep dale ur Bibl disi e Brezhoneg. Ur Bibl disi e-keñver an droidigezh, diazezet war an testennoù Hebreek ha Gresianek. Ur Bibl disi e-keñver ar yezh, savet gant tud hag o deus labouret war ar Brezhoneg e-pad bloavezhioù. Bet hon eus dija un tanva eus o labour. Pemp levr a zo bet dija embannet.

Tu a vefe sur-mat d'implijout an droidigezh-se en holl ilizoù Breizh-Izel. En istor ar Brezhoneg ez eo bet an 19^{et} kantved, kantved Ar Gonideg. An 20^{et} kantved a vo marteze - ha n'on ket va-unan o lavarout se - kantved ar Bibl Brezhonek.

29.4.56

. () () () ()

G R E O M P B R U D E R E Z H !

E-pad devezhioù-studi Ploueg-Ar-Mor, e oa bet aozet un diskouezadeg-levrioù brezhonek en unan eus klasoù ar skol. An dud diredet di a chomas souezhet o welout pegen niverus ha pegen lies-seurt ez eo al levrioù brezhonek, adalek ar romantoù hag ar pezhioù-c'hoari betek al levrioù-skol. Hag an holl levrioù ne oant ket eno; ne weled nemet ar re a oa bet embannet abaoe 1930 pe war-dro. E-kichen an diskouezadeg e oa bet astennet ur stal vihan - gant un nebeudig levrioù - a werzhas evit 10.000 lur a varc'hadourezh ! Ne oa ket fall tamm ebet pa soñjer ne oa tremenet dre eno nemet 34 a dud.

Kudenn an emsav breizhat eo kudenn ar Bruderezh. Hon menozioù n'int ket anavezet mat. Alies e vezont distummet gant tud ha n'ouzont ket, setu tout; a-wechoù e vezont distreset gant tud a volontez fall hag a oar petra a reont. Al levrioù n'int ket anavezet. Chom a reont da gozhañ e ti ar voulerien, pe da boultrenniñ e presoù mignoned ar Brezhoneg. Poent eo dimp dineiziañ hon menozioù, hag hon levrioù. An devezhioù aozet gant "Kendalc'h" hag ar "Bleun-Brug" a labour war an dachenn-se. Met o zachenn a zo un tamm re strizh. Tapout a reont mont betek un nebeudig tud, ha setu tout.

Ret eo dimp mont betek an holl. D'am soñj e vije mat aozañ en holl gerioù - eus ar c'hêrioù ez eo bet deut a-viskoazh ar gizioù - un doare Sizhun Vreizhat, diwar skouer ar pezh a zo bet en Amsterdam gant ar "Sizhun Friziat". Kregiñ a reas d'ar Sul 5 a viz C'hwevrer gant un ofis protestant renet gant ur pastor eus **Haarlem**. D'ar Meurzh, Maer Amsterdam, an Ao. J. d'Ailly - un anv souezhus evit un Hollandad - a zigoras an diskouezadeg-levrioù e Bibliotek Publik ar gêr. D'an noz-se e oa bet c'hoariet ur pezh e Frizeg. Kalz a Friziz a zo e kêr Amsterdam, ha gant se ne oa ket diaes kaout selaouerien. D'ar yaou d'an noz e oa bet displeget un nebeut prezegennoù e Skol-Veur ar Gêr en Amsterdam, diwar-benn ar bedagogiezh, ekonomiezh Europa, ha plas ar broioù bihan en un Europa federal. D'ar gwener d'an noz e voe klozet ar sizhun gant ur rummad prezegennoù all e Skol-Veur Libr Kalviniat Amsterdam. Ne oa bet lezet den ebet a-gostez eta, ha sklaer eo e oa chomet diwar gement-se ur roud bennak e speredoù an holl e kêr.

D'an 10 a viz Mae en em gav ar bloaz-mañ "Devezh ar Brezhoneg". Kestet e vo adarre evit dastum arc'hant da voulañ levrioù-skol brezhonek. An dud a ro o arc'hant sur-mat, met alies hep gouzout perak. Ret e vije diskouez dezho ez eo stag kudenn ar Brezhoneg, en gwirionez, ouzh kudennoù all Breizh. Pegen stag ez eo kudennoù Breizh ouzh kudennoù ar Frañs - pa seller oute gant daoulagad dibikouz - hag ouzh kudennoù Europa hiziv hag arc'hoazh. Ezhomm hon eus evit se eus "Sizhunvezhioù Bruderezh evit Breizh". Ret eo dimp mont er-maez eus hon ghetto, hag embann hon aviel d'ar pevar avel.

20.5.56

()()()()

LEVRIOU BREZHONEK

En deiz all e skrive din ur mignon da c'houlenn pelec'h e kavje levrioù brezhonek da brenañ evitañ hag evit e vugale. Soñjet em eus e oa meur a hini e-touezh va lennerien hag a garfe gouzout kemend-all. Hiziv avat e komzin hepken diwar-benn al levrioù evit tud vras.

Evit ar mare daou di dreist-holl a werzh levrioù brezhonek : SKRIDOU BREIZH hag AL LIAMM. E ti "Skridoù Breizh" e vez kavet da gentañ levrioù-studi aozet gant ar mestr-kelenner Roparz Hemon : ur geriadur Brezhoneg-Galleg, ur geriadur Galleg-Brezhoneg, hag ur C'hramadeg. Ar re a glaskfe gouzout hiroc'h diwar-benn o yezh a c'hellfe c'hoazh prenañ labour meur Fransez Kervella : "Yezhadur ar Brezhoneg". Met al lodenn vrasañ eus an dud eo gwelloc'h ganto peadra d'en em ziduiñ. Er penn kentañ e c'hellan lakaat "An Ti Satanazet", gant Jakez Riou, ar skrivagner kernevat. Kontañ a ra troioù-kamm c'hoarvezet gant daou baotr yaouank aet war an oad ha gant o zintin gozh. "An Aotrou Bimbochet e Breizh", aozet gant Roparz Hemon a lak ivez da c'hoarzhin met diwar goust ur Parizian deuet da vale ha da studiañ ar vuhez e Breizh war-dro ar bloaz 2.000. Al levr-se a zo dija kozh, met atav e vez lennet gant kalz a blijadur. Ar re a vourr lenn kontadennoù berr ne vint ket sur mat de-sevet gant "Dremm an Ankou" - a zo un tamm eñvorennoù-brezel Abeozen, brezel 1914-1918 - na gant "Kleier Eured", e-lec'h ma klask Roparz Hemon livañ tud ar bobl e Brest.

Dindan an titl : "Labous ar Wirionez" e kavomp 8 kontadenn-bobl, dastumet hag adskrivet gant Troude ha Milin. "Skridoù Breizh" a ginnig dimp c'hoazh daou romant. "En ur rambreal", ur romant polis, ha "Hervelina a Geraouell", ur romant karantez. Un nebeut bloavezhioù 'zo dija int bet embannet, ha d'ar mare, em eus soñj c'hoazh, en boa bet kalz a blijadur ouzh o lenn. "Ar Pemp Pezh-C'hoari" e c'hell rentañ servij d'ar strolladoù-c'hoarierien, hag a vez dalc'hmat o klask danvez brezhonek. N'eus forzh penaos talvezont ar boan bezañ lennet. Troidigezh "An Dr Fostus", aozet diwar Saozneg Marlowe gant Roparz Hemon, a zo ur mestr-taol.

Ar gelaouenn "Al Liamm", renet gant va mignon Ronan Huon, kelenner e Lise Brest, a embann muioc'h-mui levrioù hag a vez e gwerzh e ti Pêr Bodenan en Ergué-Armel, Kemper. Komzet em eus dija amañ eus eñvorennoù J'arl Priel : "Va Zammig Buhez" ha "Va Buhez e Rusia". J. Priel a oar livañ an dud, kontañ an darvoudoù, ha gouzout a ra ar Brezhoneg evel p'en dije komzet nemet ar yezh-se e-pad e vuhez. (J. Priel a gaoze 8 pe 9 yezh, en o zouezh ar Rusianeg !) Betekhen e oa anavezet evel skrivagner pezhioù-c'hoari. "Al Liamm" he deus nevez embannet daou anezho e-giz levrioù distag : "Ar Spontailh" ha "Kleñved an Togn", hag ur pezh all gant Tangi Malmanche : "An Antekrist".

Nevez 'zo eo deuet er-maez ur romant-polis aozet gant Roparz Hemon hag anvet "An Ti a Drizek Siminal". Al levr-mañ a c'hellan erbediñ da n'eus forzh piv, met dreist-holl d'ar re a zo nevez grog gant studi ar yezh hag a vez berr ganto ar gerioù brezhonek. N'eus ket el levr-se ouzhpenn 1.200 ger disheñvel, aozet ma'z eo bet diwar ur roll gerioù, ar "Brezhoneg Eeün", un doare "Basic Breton", mar kirit, evit troc'hañ berr-ha-berr.

Ha m'hoc'h eus ur mignon bennak, divrezhonek hag o klask deskiñ ar yezh, kinnigit dezhañ diouzhtu "Cours de Breton Élémentaire" gant Roparz Hemon. Me a ra e-giz-se. Dalc'hmat em bez un nebeut skouerennoù eus al levr-se em fres. Dec'h c'hoazh em boa roet unan d'ur c'hloareg hag a zo oc'h ober e servij war ul lestr-brezel e Brest. Teir gwech ez eo bet embannet al levr bihan-se, ha diouzh ma kleven nevez 'zo e vo ret adlakaat anezhañ war ar stern hep dale.

N'em eus ket komzet eus an holl levrioù brezhonek, evel just, hag a gaver war ar marc'had. Komzet em eus eus ar re a zo an aesañ da brenañ hag a zo ivez, moarvat, e-touezh ar re wellañ.

9.12.56

()()()()

LEVRIOU EVIT AR VUGALE

Kement-mañ, moarvat, a lakao souezhet meur a hini : moulet ez eus bet, ha moulet e vez c'hoazh levrioù brezhonek evit ar vugale. N'eo ket hepken katekizoù pe gantikoù pe c'hoazh levrioù-skol evel re ar "Bleun-Brug" evit ar skolioù kris'en, pe re "Ar Falz" evit ar skolioù laïk. Levrioù gant skeudennoù stank ha lizherennoù bras evit diduiñ ar re yaouank.

Daou di adarre a ra war-dro an dra-mañ : SKRIDOU BREIZH hag AL LIAMM.

SKRIDOU BREIZH o deus adembannet "Marvailhoù ar Vretoned". Al levr-se a zo kozh a-walc'h, hag ar skridoù a zo koshoc'h c'hoazh peogwir ez int bet dibabet gant Roparz Hemon er gelaouenn "Kroaz Ar Vretoned" a oa bet renet gant Fanch Vallée etre 1898 ha 1920. "Marvailhoù ar Vretoned" a zo tost d'am c'halon : el levrig bihan-se em boa desket lenn Brezhoneg bremañ 'z eus 20 vloaz ! Ha desket mat em boa, peogwir abaoe em eus bet lennet pe dost, kement levr a zo bet embannet e Brezhoneg e-pad an 20 vloaz diwezhañ.

Abeozen en deus dastumet e "Marvailhoù al Loened" ur bern kontadennoù berr diwar-benn al loened gouez a gaver en Afrika hag en Aostralia. "Buhez Lommig" a gont trubuilhoù un den bihan ganet eus un dakenn dour. Al levr a zo leun a skeudennoù aozet gant X. Haas. An destenn daoust ma 'z eo diwar bluenn Youenn an Drezen, eus Pont 'n Abad, a zo un tammig diaes marteze evit ar vugale.

Renerien Al Liamm a zo anezho tadoù-familh ha setu perak o deus soñjet e oa ret embann levrioù plijus evit ar vugale. N'ouzon ket penaos en em zibabont, met deuet int a-benn - trec'hiñ a ra "Al Liamm" war bep skoilh - da lakaat moulañ ha zoken da werzhañ aes a-walc'h, pevar levrig hag a zo par d'ar re a vez kavet er broioù all. Pep hini en deus war-dro 28 pajenn ha 10 skeudenn a vent gant ar pajennoù. Dindan ur gwiskamant ken fado-se e kinniger d'ar vugale, hag ivez d'o zud, 4 c'hontadenn anavezet eus pedet vro disheñvel : "Merc'hig ar Rozenn", gant Andersen (Danmark); "Paotr e Varv Glas", gant Perrault (Frañs); "Robinson Kruzo", gant De Foe (Bro-Saoz) hag ar "C'hemener Bihan Kalonek" gant ar vreudeur Grimm (Alamagn).

Met ar gontadenn vravañ tout, daoust ma n'eo ket bet skeudennet, a zo c'hoazh hep mar ebet, istor "Bisousig, Kazh an Tevenn", kontet dimp gant Abeozen. N'anavezan ket Abeozen. Bet eo kelenner e liseoù ar gouarnamant, ha bez' eo ivez tad-kozh, marteze. Ha setu perak e kar kement skrivañ evit ar vugale.

Kalz eus hon levrioù-bugale a vefe da adembann, hag ezhome bras a vefe da embann reoù nevez. Arc'hant a zo ret evit se, avat. Kinnigit levrioù brezhonek d'ho mignoned bihan : plijadur a reot dezho, ha vad a reot d'ar brezhoneg.

23.12.56

()()()()

NEDELEG BREIZH

Anatol Ar Braz en deus bet addispleget brav e Galleg ar c'hontadennoù dastumet gantañ e Brezhoneg. E varzhonegoù gallek a zo avat paour a-walc'h, ha war an dachenn-se ez eo trec'h dezhañ Charlez Ar Govig. E Brezhoneg avat en deus skrivet ur varzhoneg hag a dalvez ar boan bezañ lennet ha desket d'ar vugale. Eus "Nedeleg Breizh" e fell din komz. Enni e tispleg e garantez evit e vro hag e esperañs en hec'h amzer-da-zont.

Echu eo ar bloavezhioù kriz,
An oabl a ya da zigeriñ.
Nedeleg Breizh a zo arri !

E-kreiz trubuilhoù an amzer a-vremañ, arabat dimp ankounac'haat amzer-da-zont hor bro. Labourat evit Breizh da zont e zo labourat evit bugale ha yaouankiz ar vro, ha labourat evitañ e-unan. Ar stourm hag al labour a ro tu d'an den da greskiñ ha da zisplegañ holl nerzhioù kuzh e spered ha da derrañ c'hoantoù e galon.

E beg ar stourm en em gav un nebeudig tud hag o deus gouestlet o buhez dizamant da silvidigezh o bro. Da geñver Nedeleg ez eo arabat dimp o ankounac'haat. Ezhomm o deus eus hon frealz hag eus hon skoazell. Ne gomzin amañ hiziv nemet eus ar c'helaouennoù brezhonek pouezusañ.

AL LIAMM en deus kemeret plas ar gelaouenn "Gwalarn". Evel e c'hoar henañ a ra war-dro al lennegezh. E-pad ar bloaz tremenet en deus embannet barzhonegoù, kontadennoù berr, kontadennoù poblek, pennadoù istor hag a zo sinet gant hor gwellañ skrivagnerien : Abeozen, Per Denez, Klerg, R. Huon, R. Hemon, Jarl Priel, h.a. Tud 'zo o deus plijadur o lavarout ez eo diaes da lenn Brezhoneg AL LIAMM. Kement-se a zo gevier na reont vad da zen nemet da enebourien ar Brezhoneg. Pennadoù aes-tre a gaver e-barzh AL LIAMM hag a c'hell bezañ lennet gant n'eus forzh piv hag a oar lenn un disterañ hor yezh. Kavet e vez ivez pennadoù skrivet diwar traoù uhel hag a zo un tammig diaesoc'h. Kavet e vez c'hoazh pennadoù diaes hag a-wechoù siek marteze. Troet e Galleg e vefent ken diaes all da lenn. Me a bren bep sizhun "Le Figaro Littéraire" na lennan ket penn da benn, pell ac'hane ! Pennadoù 'zo a gavan diblijus evidon, ha zoken re ziaes evit va zammig kokenn !

Ganedigezh ha kresk BARR-HEOL a zo bet heñvel ouzh hini ur meteor ! Goude bezañ bet e-pad ur bloaz kannadig Bleun-Brug eskopti Sant-Brieg ez eo bremañ ur gelaouenn distag diouzh pep strollad. Un niverenn a vez embannet bep tri miz, hag e pep hini e kaver ur dornad menozioù paket mat, displeget brav ha diazezet atav war ur gelennadurezh kristen rik. Barnadennoù diwar-benn kement tra a vez graet a-du pe a-enep ar Brezhoneg ha Breizh, alioù mat, studiadennoù berr diwar-benn an emsav breizhek. Ma n'hor bije ket BARR-HEOL e vije ret krouiñ anezhañ. "Bleun-Brug" hag "Emglev Breiz" a zo deuet da vezañ strolladoù hanter-ofisiel pe zoken ofisiel. Fosilikaat a rafent mar ne vije en o c'hichen kelaouennoù ha strolladoù bihanoc'h met a zalc'h da zigeriñ an hent dirazo ha d'o broudañ.

NEDELEG BREIZH (II)

BLEUN-BRUG a zo kelaouenn vizek diskibien an Aotrou Yann-Vari Perrot, abostol "Feiz ha Breiz". Gwechall e veze gwerzhet "Feiz ha Breiz" a vilieroù ha bez' e oa e meur a barrez kelaouenn vrezhonek ar bobl kristen. Siwazh, gant kresk levezon ar skol c'hallek, a yezh hag a spered, ez eo aet niver ar seurt lennerien war vihanaat. Evit derc'hel penn da "Le Pèlerin", ha da "La Vie Catholique", hep komz eus "Match", e vefe ezhomm kalz arc'hant ha kalz kenlabourerien barrek da skrivañ war bep tachenn eus ar vuhez. Setu perak e karfen gwelout BLEUN-BRUG o kemmfañ stumm. Plijout a rafe din un dastumadenn drimiziec dezhi niverennoù tevoc'h, 80-100 pajenn, gant kontadennoù, pezhioù-c'hoari, pennadoù bev diwar-benn kudennoù ar vuhez a-vremañ. Ha c'hoazh gwech-ha-gwech all e vefe tu d'embann dastumadennoù kanaouennoù, pezhioù-c'hoari, unangomzoù, hag a rentfe kement a servij d'ar skolioù ha d'ar strolladoù-yaouankiz. Ur rebech a rin da BLEUN-BRUG. Pellaat a ra muioc'h-mui diouzh ar Brezhoneg Unvan, evel ma oa bet diazezet gant Fransez Vallée evit tostaat ouzh doare-distagañ Bro-Leon. N'eo ket kement-se a c'honezo d'an doare-skrivañ nevez ijinet gant Leoniz skrivagnerien na lennerien Bro-Dreger. Evidomp-ni emañ silvidigezh ar yezh er peurunvanidigezh.

SKOL a zo anezhi dreist-holl ur greizenn-studi. A-hed ar peder niverenn embannet betek-hen e welomp sklaer soñjoù ar rener : digeriñ an hent d'ur Skol Nevez e-lec'h ma vo kenteliet pep tra dre ar Brezhoneg, hag e-lec'h ma vo desket ar Galleg tamm-ha-tamm hag evel eil yezh. Kement-se evit brasañ mad ar bugel, ha brasañ mad ar Brezhoneg hag ar Galleg. An doare skoliata-se a vez implijet dija e kalz a vroioù bihan evel e Kembre hag e Bro-Friz-Holland; studiet ez int bet adost gant an Ao. Kalvez e niverennoù I ha 2 eus SKOL. An niverenn 3 a zo anezhi ur geografiezh gant an Ao. Guilcher, kelenner e Skol-Veur Nancy. Un dastumad 300 DIVINADELL a gaver en niverenn 4, hag a c'hell skoazellañ da gelenn ar brezhoneg er gêr evel er skol. Prometiñ a reer dimp studiadennoù nevez diwar-benn ar skolioù er Slesvig, en Danmark hag en Alamagn, hag en doare-se hor bo tro da zistreiñ war al labour ken mat boulc'het gant SKOL.

Ar stourmerien hag ar skrivagnerien a labour endro d'ar peder c'helaouenn-se a chom peurvuiañ didrouz. O foan a zo bras sur-mat, met ivez o joa. Ha ken bras eo levezon an hini a ra anaoudegezh ganto ha gant o oberennoù : emaint o tanzen ur Vreizh Nevez. A-drugarez dezho e teu tamm-ha-tamm da wir komzoù Anatol Ar Braz :

Nedeleg Breiz a zo fenoz,
Deus hag e weli o repoz,
Breiz Nevez war daoulin Breiz Koz !

()()()()

Pennad diwezhañ, chomet diembann.

BUTUN HA KOKA-KOLA

Pa oan an hafiv diwezhañ en Alamagn e welen bep beure ar memes den o prenañ e bakad sigarettenoù digant ur pourchaser otomatek stag ouzh mur ar marc'hadour butun. Un tamm fent am beze gant an den-se : un den hir ha treut e oa evel ur vazh wisket, ha moal war ar marc'had !

Kaoz a zo bet ivez er Frañs da lakaat seurt binvioù en implij. Ar varc'h-adourien-vutun, evel just, o deus savet o mouezh enep an dra-se. Ostaleri a vez gante er Frañs ha da heul ur pakad sigarettenoù ez a ur bannac'h, hag alies meur a hini. Gwir eo e kaver c'hoazh en ostalerioù, stalioù-bara hag ispiseri. An eil kofivers a ya da heul egile, ha ret eo evañ pe tremen evit un den tost ha savet fall !

Er Frañs e kaver - hervez "La Croix" - un ostaleri evit 90 a dud; en Alamagn, unan evit 246; hag e Norvegia, unan evit 3 000 ! Gwir eo ez eo ker daonet an evajoù alkolek e broioù an Norz. E gar Kopenhagen, e paeer ur voutailhad "Champagn" 3 000 lur, met gellout a reer evañ ur werennad laezh evit 20 lur, hep na vefec'h debret gant selloù ar veajourien all. An alkohol a zo rouesoc'h ha keroc'h c'hoazh er Sued, peogwir tud ar vro-se a dreuz ar mor evit dont da gemer ur bannac'h en Danmark.

Ur wech ma oan taget gant ar sec'hed, em boa graet tro kêr Cardiff e Breizh-Veur, evit klask un ostaleri digor. Holl e oant serret, ha ret e oa bet din mont betek ar gar, ha tremen gant ur werennad dour-frouezh. Hervez, e Pariz, war ar bouloardoù bras e vez servijet muioc'h a zour-frouezh eget a evajoù alkolek. Dre amañ ne gomzer ket kalz eus ar C'hoka-Kola. E Belgia hag e Holland, n'heller ket ober ur paz hep gwelout ar skritell-mañ : "Drink Coca-Cola !" ("Evit Koka-Kola !") Tañvaet em eus an evaj nevez-se ur wech, e Bruxelles, tost da gañstell Laeken. N ankouain biken an dervezh istorel-se; ha promet mat em eus ouzhin ma-unan ne stokje ken ma muzelloù ouzh un dra ken divl z.

En Alamagn e prenen ur c'hartad pe un hanter-litrad laezh en ur voest kartofs, a c'hellen klenkañ em malizenn. O tremen dre Bariz, war hent ar gêr, em boa klasket ober kemend-all e gar Montparnasse. N'em boa kavet nemet laezh tomm, d'evañ diouzhtu, ha c'hoazh e oa karet.

Ar Fransizien o deus ar vrud da vezañ lonkerien. Ar wirionez eo ivez, hervez ar statistikoù. Ar Fransizien a zispign 8,8% eus o leve da brenañ evajoù alkolek, ha 4% hepken evit o yec'hed. Pep den er Frañs a zispign war-dro 50 lur ar bloaz da brenañ levrioù; e Belgia, 250 lur; e Breizh-Veur, 1 000 lur; hag en Amerika, 2 500 lur. Sant Aogustin a skrive : "Trahit sua quemque voluptas". Ar Vretoned a lavar c'hoazh hiziv : "Askorn ma c'hi, logodenn ma c'hazh". Ha me a lavaro da glozañ ar gont : "E beg ar skourjez emañ ar flipenn."

18.12.55

()()()()

A R B E L E G D U

An den du kentañ am eus anavezet ne oa ket un den, met un tamm statu, ar paotr bihan du a vije lakaet da gestal bep bloaz ouzh kraou ar Mabig Jezuz. D'ar c'houlz-se, bugale ar bourg hag ar skol o dije kalz a zevosion e-pad amzer Nedeleg. Mont a raemp da zaoulinañ dirak ar morian bihan, ha da lakaat dezhañ en e chipod ur gwenneg bennak, pe aliesoc'h c'hoazh un tamm min-glas, evit kaout ar blijadur da welout anezhañ o plegañ e benn !

Gouzout a raen mat e vije dastumet an arc'hant-se evit bugale ar misionoù. Lenn a raen gant dudi "Kannadig ar Vugaleaj Santel", a vije roet d'am c'hoarezed gant seurezed ar skol gristen. Karet em dije bezañ paeron d'unan eus ar vugale dilezet-se, met biskoazh ne oan deuet a-benn da gaout ma c'hoant. Moarvat n'em boa ket bet kalen a-walc'h da dennañ eus ma fodig-espenn an ugent real a vije goulennet d'ar c'houlz-se.

Ne oan ket va-unan avat oc'h ober huñvreoù santel. Nepell diouzh ti ma zud e oa ur person kozh - ne oa ket hini ma farrez - hag en doa c'hoant bras da welout ur beleg du ! Kement-se ne oa ket diaes, a soñjas ur beleg yaouank diwar-dro, hag a blije dezhañ kalz c'hoari troioù-louarn. Blev du ha rodellek en doa, ha fuilh war ar marc'had evel gloan un danvad. Trawalc'h e vije dezhañ eta tremen un tamm livaj war e vizaj hag e zaouarn. Kaset e voe ul lizher d'ar paotr-kozh, a bedas ar beleg du da zont da verennañ d'ar sul warlerc'h. E-pad ar pron e tegemennas d'e barrezianiz ar c'helou bras ha souezhus. Gellout a rit krediñ ne oa bet den trist ebet ouzh taol er presbitoar an deiz-se. An hini a oa o servijifi, ur beleg, mar plij ! a skuilhas war ar planchod ur pladad legumaj e-kreiz ur barrad c'hoarzhin. Hir e oa bet ar pred, met ret e voe memes tra distaoliañ evit mont d'ar gousperoù. Poent e oa, rak daouarn ar morian a oa krog da wennaat !

Goude an taol kaer-se, ar beleg du, hag a ouie brezhoneg kenkoulz ha c'hwi ha me, a savas ur chanson :

"Sistr ha gwin e oa bet,
Hep kontañ pezh he doa graet Katrin..."

Tud 'zo a glaskas divankañ ar person kozh, met ne selaouas ket anezhe, ha betek e eur ziwezhañ e kredas en doa bet an enor da zegemer ur beleg du ouzh e daol.

Soñj a zo deuet din eus kement-se tout, pa welen, en hañv diwezhañ ur beleg morian, unan gwirion, ganet er C'hameroun, ken du e groc'hen hag ur billig, oc'h oferennañ hag o prezeg e-barzh ma iliz-parrez. Baleet eo bet, ha rentet dezhañ an holl servijoù en doa ezhomm. An holl dud o deus graet dezhañ un degemer karantezus ha doujus. E Stadoù Unanet Amerika n'emañ ket kont evel-se, siwazh. El Louisiana, un nebeut katoliked o deus difennet ouzh ur beleg du, amerikan evelte, lavarout an oferenn en o chapel, ha kement-se hepken dre ma ne oa ket ken gwenn e groc'hen hag

o hini. Eskob Orleans-Nevez ne fell ket dezhañ plegañ war ar poent-se, ha ne vo kaset beleg all ebet d'ar chapel-se.

Ar Gatoliked-se, pegen trist eo, n'o deus komprenet Spered an Aviel, a zo leun a garantez evit an holl dud, ha leun a zoujañs evit an holl veleien, n'eus forzh pehini e vefe o bro pe liv o c'hroc'hen. Setu sur-mat ar c'hentelioù a roe ar Paotr Bihan Du da vugale ma farrez, ha ret eo krediñ ec'h int chomet merket don en o c'halonoù.

25.12.55

()()()()

H A G H O R P A T A T E Z ?

Un tad-familh a zo o paouez kuitaat va zi. Laouen-bras e oa. Nevez feurmet en deus ur begad douar; temzet druz eo bet; ha hep dale e vo lakaet an alar e-barzh. Esperans en deus e savo patatez kaer, peadrañ da vevañ e vugale e-pad ar bloaz. Evitañ n'eus riskl ebet; ne ranko ket mont da glask gwerzh d'e varc'hadourezh. Met ar re all, al labourerien ? Ha soñj hoc'h eus e oa bet rostet hektarioù ha hektarioù warlene en un nozvezh ? Ha soñj hoc'h eus e oa bet gwerzhet an avaloù-douar abred war goll ? Hag ar binvioù nevez, hag an temz-ludu a oa chomet da baeañ ! N'eus ket pell, ul labourer-douar, hag a zo un den fin ha desket war e vicher zoken, a lavare din ne ouie ken petra hadañ !

Ret eo anzav ez eo kozh a-walc'h ar gont-se e Breizh. Bremañ ez eus ugent vloaz en doa ranket va zad, ha meur a dad all eveltañ, paeañ va fansion er skolaj gant ed; ya, gant ed ! E c'hrignoloù a oa leun-kouch met e yalc'h a oa goulllo. E-keit-se, ar gweturioù aozet gant A. Citroen, a vije paeet gant gwinizh, pa vijent prenet gant an U.R.S.S. E-keit-se, batimantoù ar gompagnonez Louis-Dreyfus a zegase ed eus ar Maroko. Diskargañ a raent avat er porzhioù-mor div wech muioc'h a winizh evit na vije eostet er vro-se ! Eus pelec'h 'ta, Ma Doue, e teue ar peurrest ? Ne oant ket moarvat madoù Sant Erwan ! E-keit-se c'hoazh, ar Gompagnonez Vras Tranzatlantek a brene he fatatez digant Bro-Holland; he c'hig digant Amerika; hec'h amanenn digant Danmark; hec'h ed digant Ar C'hanada; hag he laezh e Bro-Saoz. Ar gwin, eveljust, n'eus ezhomm da lavarout, a vije prenet er Frañs. (N'eus ket kalz a win da werzhañ e Breizh, gant se !) Ha ma vije bet konfitur da brenañ, moarvat e vije bet kavet en Alamagn, peogwir d'ar c'houlz-se, daoust ma oa Hitler o komañs gant e reuz, n'oa c'hwez ebet gant an arc'hant. Hag ar Gompagnonez Vras-se ne veve nemet gant sikour aluzonoù roet dezhi gant ar Gouarnamant. Mat e vije bet dezhi soñjal un tamm er re a roe an arc'hant-se. Ar Vretoned n'o doa ken nemet un dra d'ober : mont da vartoloded war vord batimantoù ar Gompagnonez Tranzatlantek, ha huchal a-bouezh penn : "Vive la République !"

Ar brezel a zo tremenet. An traoù ne dint ket aet war wellaat. Er Frañs ez eus re a win, ha re a sukr. Ret eo difoariañ eus ar varc'hadourezh-se, koustet a gousto, ha pa vefe diwar goust ar Vretoned. An avaloù-sistr ivez a chom diwerzh. Daoust hag-efi ne vije ket gallet izelaet an tailhoù warne ? Perak ne vez ket graet dour-frouezh gante ? An evaj-se a vije gwerzhet mat en Alamagn hag e Bro-Saoz. Ya, e Bro-Saoz, met ret e vije prenañ un dra bennak diganti, un tamm glaou marteze, ha ne goustfe ken ker dimp ha hini an Nord.

Poent eo, ha poent bras zoken, da C'houarnamant Pariz treiñ e selloù war-du Breizh. Ingal a-walc'h eo dimp piv a vo gouarnour Aljeria; ingal eo dimp pe-seurt Ben Youssef a vo Sultan ar Maroko; ingal eo dimp c'hoazh pet ministr a vo er Gouarnamant nevez. Pezh a c'houlennomp ? Pezh hon eus ezhomm bras ha droed da gaout, peogwir n'omp ket bastarded : skolioù e-lec'h ma vo desket d'hon bugale bevañ, labourat ha karout Doue ha Breizh; feurmioù modern ha plijus; uzinioù nevez; ha gwerzh d'hon marc'hadourezh.

H E N T O U S T O U V E T

Disul ar beure em boa tro da vale dre Vro-Dreger, hag evel un taol-chafis, n'em boa kavet hent stouvet ebet. Moarvat n'eus ket bet kement a hentoù stouvet e Breizh hag e Kreisteiz ar Frañs. Kement-se ne dalvez ket da lavarout e vefe gwelloc'h stad al labourerien-zouar amañ eget du-hont. Kreisteiziz a oar en em zifenn kalz gwelloc'h eget ar Vretoned.

Kudennoù hon labour-douar a zo daou seurt anezho. Kudennoù a c'honidigezh : gouzout an doareoù gwellañ da hadañ ha da sevel loened. Kudennoù a werzh : ret eo kaout prenerien d'hon marc'hadourezh. Evit kaout un diskoulm n'eo ket a-walc'h hopal, na zoken stouvañ an hentoù ouzh baleerien ar Pantekost. Ret eo klask gwrizioù an droug.

Nevez 'zo e lennen war ar journalioù pemdeiziek e vefe kaset Breizhiz yaouank da studiañ al labour-douar e Bro-Danmark. Un dra vat eo d'am soñj. Kalz hon eus da zeskiñ digant ar vro-se. Ur vro vihan eo : un tammig hepken brasoc'h eget Breizh; ganti douaroù paour ha pinvidik, evel hon re, hag un temz-amzer klouarek ha gleborek evel hon hini. Ar c'hentañ tra da zeskiñ digant Danmark eo kement-mañ moarvat : ret eo reiñ d'hon danvez-peizanted deskamant, un deskamant dre vras da gentañ, ha da c'houde un deskamant don a-walc'h war o micher. Petra a c'hoarvez e Breizh ? Alies e weler ar re yaouank pellaet diouzh an douar dre ar skol. Ar re speredekañ a glask micherioù muioc'h diboañ ha muioc'h arc'hantus. Deskamant ar re all a vez berr peurvuiañ; un deskamant dastumet el levrioù, pell diouzh ar vuhez, hag a nij kuit buan. Arabat kennebeut kemer evit deskamant an anaoudegezh o deus ar skolidi eus reolennoù luziet ar C'hramadeg c'hallek deiz o santifikad; reolennoù hag a vo ankounac'haet ur miz goude. N'o devo ket zoken desket karout al levrioù. Nag a eurioù kollet gant bugale ar beizanted, hag a c'hellfe bezañ implijet gwelloc'h e skolioù ispisial, e skolioù teknek evit al labour-douar. Met e peseurt skolioù labour-douar ? N'eus en hon departamant nemet teir pe beder. Ezhomm a vije unan e pep kanton. Pell emamp diouzh ar gont. Pezh a zo gwashoc'h, Pariz - peogwir ez eo ret tremen dre Bariz evit kaout an disterañ staotigell - a chom bouzar ouzh goulannoù ar Vretoned. E diwezhañ bodadeg Kuzul hon Departamant ec'h anzave an Ao. Pleven e oa bet nac'het gant ar Ministr al Labour-Douar sevel ur skol labour-douar. Evel-se e nac'her ouzhimp an arc'hant a vije ezhomm evit sevel ur chaoser vras war ar Rañs hag evit prenañ raz evit hon douaroù. Pariz a glask reiñ d'ar Vretoned an deskamant a ray gante mitizhien evit Aotronez Pariz, pe ouvrierien evit o uzinioù; met nac'h a ra ouzhimp an deskamant a rafe gant hon bugale gwir Vretoned barrek da c'honit o bara en o bro.

Amañ e lakaomp ar biz war an droug, war-un-dro gant an Ao. Pleven. En em c'houlenn a ran hag-eñ n'emañ ket ar C.E.L.I.B. en un enkadenn. Dizoloet en deus

ezhommoù Breizh, ha roet d'ar Vretoned un anaoudegezh anezho. Pezh a zo mat. Met er pep diaesañ a chom d'ober. Kas da benn ar programm. Gellout a reomp fiziout war bolontez vat paotred ar C.E.L.I.B. Ret eo dimp kontañ ivez gant bolontez fall paotred Pariz. Da lavarout eo klask ren ni hon-unan hon aferioù-ni dre ur Parlamant Breizh. Slogan hon holl parlamante rien a dlefe bezañ - hag e vo hep dale, mar n'int ket tud gwerzhet ! - ur Parlamant e Roazhon !

27.5.56

()()()()

DEMOKRATELEZH

Abraham Lincoln, Prezidant Stadoù Unanet Amerika, en doa displeget evelhen an Demokratelezh : "Gouarnamant ar Bobl, dre ar Bobl, hag evit ar Bobl". Ma teufe A. Lincoln d'ober un tamm tro war an douar en dije digarez da vezañ sabbatuet meur a wech. Ne vije ket ret mont betek Demokratelezhioù Poblek Kreiz-Europa. A-walc'h e vije diskenn e Londrez d'ober ur weladenn da Churchill. Er votadegoù diwezhañ he deus bet Kostezen ar Virourien, hini Churchill hag Attlee, ar muiañ a vouezhioù hag a zeputeed. Er votadegoù a-raok he doa bet muioc'h a zeputeed, met nebeutoc'h a vouezhioù eget Kostezen al Labour.

En Hanternoz Iwerzhon ez eus bet dibabet da zepute daou zen hag a zo er prizon ! An daou-se eta n'hellint ket komz zoken en anv an dud o deus votet evito. Trouz a vo c'hoazh en Hanternoz Iwerzhon, hag an trouz ne davo nemet pa vo adstaget ar c'horn-bro-se ouzh Republik Eire.

Kostezen Vroadel Kembre he doa 11 kandidad. Unan anezho a zo en toull evit bezañ nac'het mont d'ober e servij. Kaout a ra dezhañ ez eo gwelloc'h labourat evit Kembre eget en em lazhañ evit ar "British Empire". Henezh eta, n'eus forzh penaos, ne day ket da Londrez. Nag e kenseurtet kennebeut. N'o deus ket bet a-walc'h a vouezhioù. Esperañs vat o deus avat da vont di un deiz bennak, rak bep tro e c'hozeont mouezhioù diwar goust ar Virourien ha paotred al Labour. Stourmet e vez enep an Nationalisted e pep stumm, zoken gant armoù an demokratelezhioù modern ! Nac'het eo bet outo ober bruderezh dre ar Radio dre n'o doa ket kandidaded e Breizh-Veur a-bezh. Sir Winston ! kement-se n'eo ket "fair play". Diwallit !

Goude an nebeut taolioù-pav-se e kavo deoc'h, marteze, ez on enep-demokrat a-grenn. Me 'zo ken demokrat ha n'eus forzh piv ! ha ne gavan ket fall tamm abet komzoù Lincoln. Ur soñj uhel paket brav. Goulenn a ran digant ar Pennoù Bras deskiñ anezho dindan envor, evel ma^{ra} paotred ihan Amerika, ha sentiñ outo pa savont lezennoù, pezh n'hell ket ar vugale ober !

5.6.55

()()()()

D A z-D A N I E L - R O P S

Ur blijadur eo bet evidon lenn ar pennad hoc'h eus skrivet nevez 'zo e "Quest-France" diwar-benn ho peaj en Iwerzhon : "Visite à une île amie". Bet em eus bet ivez un nebeut bloavezhioù 'zo an eurvad da weladenniñ ar vro-se. Moarvat ne oan ket chomet ken pell ha c'hwi ha ne oan ket aet ken don ha c'hwi er vro. Ma yalc'h ne oa ket sur a-walc'h ken tev hag hoc'h hini. Ne oan ket bet kaset di gant an "Alliance Française" ha n'em eus skrivet best-seller ebet ! N'eus forzh, adkavet em eus en ho pennad ar pezh am boa gwelet ha santet eno : aodoù ha menezioù heñvel ouzh re Vreizh, ur bobl devot o stourm evit reiñ labour d'he bugale ha mirout he sevenadurezh.

Bet ez eus bet un amzer ma oa ar c'hiz ober goap ouzh ar broioù bihan a glaske mirout o yezh hag ar madoù a zeue dezho eus an amzer dremenet. Sofj am eus bezañ lennet war "La Vie Intellectuelle", un dek vloaz 'zo bennak, ur pennad ha ne oa ket tener evit Iwerzhon. C'hwi da vihanañ a ziskouez bezañ komprenet talvoudegezh ar stourm-se.

E diabarzh ar Frañs ez eus ivez broioù bihan hag o deus da stourm er memes doare, ha n'o deus na parlamant na gouarnamant ebet d'o skoazellañ. En deiz a hiziv pobl Vreizh a rank stourm kalet evit bevañ. Kalz re a dud a vez ret dezho divroañ, hag ar re a chom a vev gant poan alies diwar o labour. Pa vez sinet un emglev ekonomikel bennak gant gouarnamant Pariz e vez graet re alies diwar goust ar Vretoned. Mar gellfemp prenañ un tamm glaou digant Breizh-Veur, marteze e c'hellfemp gwerzhañ dezhi ur priz mat hor patatez nevez.

Mar deo fall stad hon labour douar, stad hon skolioù a zo falloc'h c'hoazh. War zigarez reiñ deskamant d'ar Vretoned ez eus bet klasket lemel diganto o fei hag o yezh. Ar re o doa lodennet ar Frañs e departamantoù a ouie petra a raent : lakaat pep galloud ha pep nerzh etre daouarn un nebeut Parizianed. En o spered, ar skolioù a dlee bezañ milinoù evit malañ an dud, ha merat ar Fransizien nevez e-giz pakadoù chewing-gum hep liv na blaz !

Ne fell ket d'an holl Vretoned na zoken d'an holl Fransizien, bezañ chaoket evel-se. Ho pennad, spi am eus, Daniel-Rops, a zigoro o daoulagad da veur a hini.

12.6.55

()()()()

JUSTICE EST FAITE

Titl ar film brudet-se a zo deuet din war beg ma zeod pa lennen pennadoù ar c'helaouennoù diwar-benn prosez diwezhañ, n'eo ket Dominici, met Yann Fouere. A-raok ar brezel e oa Yann Fouere Rener ar Vreurieth "Ar Brezhoneg er Skol" a zeuas a-benn da lakaat ul lodenn vat eus kumunioù Breizh-Izel da votañ a-du gant kelennadurezh hor yezh. E-pad ar brezel e oa bet rener ar c'hazetennoù "La Bretagne" ha "La Dépêche", hag ivez sekretour Komite-Kuzuliañ Breizh, krouet gant gouarnamant Vichy. E miz Meurzh 1946 e voe kondaonet d'ar galeoù hed e vuhez ! Eürsamant evitañ, Yann Fouere en deus bet dalc'hmat ur fri fin, ha tec'hout a reas kuit eus ar vro e koulz vat. Mil rezon en doa bet. Ha n'on ket va-unan o soñjal kement-se peogwir d'an 23 a viz Mae diwezhañ ec'h eo bet didamallet a-grenn gant tribunal Kentañ Rannvro an Arme.

Gwashoc'h avat a oa bet c'hoarvezet gant Andreu Geoffroy. Kondaonet e oa bet d'ar marv, d'an 13 a viz Du 1951, evit un torfed n'en doa ket graet : diskuliañ daou Saoz a oa deuet da glask repu en e di. War-lerc'h ar setañs-se, e savas trouz e kazetennoù ar Broioù estren hag e Kazetennoù bras Pariz evel "La Croix", "Le Monde", "Rivarol". Ar paour kaezh Geoffroy a vevas e-pad daou vloaz buhez spontus an dud kondaonet d'ar marv, chadennet en un toull sklerijennet deiz ha noz, hag o c'hortoz bep beure bezañ fuzuliet. D'an 9 a viz Gouere 1954 e voe bihanaet ar c'hastiz gant Prezidant ar Republik ha roet dezhañ 20 vloaz galeoù. Nebeut goude e voe didamallet a-grenn. Bremañ, a-drugarez Doue, emañ A. Geoffroy o vevañ e frankiz evel pep hini ac'hanomp.

Div gentel a c'hellomp tennañ eus an darvoudoù-mañ. Da gentañ justis an dud a zo justis an dud : pell eo diouzh bezañ hep mank. D'an eil, mar tegouezh d'unan ac'hanomp bezañ tamallet e gaou, ec'h aliañ anezhañ da heuilh kentoc'h skouer Yann Fouere ha da dec'hout kuit da c'hortoz un eil prosez. Suroc'h e vo evit e vuhez, gwelloc'h e vo ivez evit enor ar Justis !

19.6.55

()()()()

SKOUER SIKILIA

Plijout a rafe din a-walc'h mont d'ober un dro betek enezenn Sikilia er Mor-Kreiz. N'eo ket evit klevout pe deskiñ an Italianeg, a gavan re ganus, na zoken evit gwelout ar menezioù-tan o tivogediñ, met evit gouzout penaos just ez eo gouarnet.

Goude ar brezel diwezhañ e oa fall-kenañ stad an enezenn. Ar bobl a oa paour, dizesk, hag alies dilabour. Tud a-vil-vern a glaske divroañ da Amerika pa dapent kaout ur viza. Ha koulskoude, hervez pezh a lavarer hag a zo sklaer hiziv, Sikilia a oa pinvidik e pep keñver. Ur vro warlerc'hiet e oa hepken, tamm ebet diouzh doare ar vuhez a-vremañ. Mankout a rae dezhi dreist-holl birvioù modern da labourat an douar, tier naet ha dereat evit an dud hag uzinioù da reiñ labour d'an holl. Kement-se avat a c'houlenne arc'hant bras. Gouarnamant Roma ne oa ket troet da zic'hodellañ. Gwelloc'h e oa gantañ dispign war an douar-bras an tailhoù dastumet en enezenn.

E 1947, e plegas gouarnamant A. de Gasperi da reiñ ur Parlamant da Sikilia d'ober war-dro hec'h aferoù-hi. Labour mat en deus graet ar Parlamant-se. Ar gazetenn "La Croix" a skrive nevez 'zo diwar e benn : "E-pad an 8 vloaz tremenet, gouarnamant Sikilia en deus graet muioc'h evit an enezenn eget gouarnamant Roma e-pad 80 vloaz". (8-6-55)

Kudennoù Breizh a zo henvel a-walc'h ouzh re Sikilia. N'eo ket souezhus eta o defe kavet mat hon politikerien mont da c'houlenn kentel diganti. E niverenn miz Ebrel "La Vie Bretonne", kazetenn ar C.E.L.I.B., e studied penaos e oa deuet Sikilia da sevel uzinioù nevez en ur vro lec'h ne oa ket a-walc'h anezho.

Hep dale, a gav din, e vo votadegoù evit Kambr an Deputeed. Perak ne labafe ket an holl strolladoù politikel e Breizh an dra-mañ war o frogram : Ur Parlamant evit Breizh. Ha peogwir ez eo d'unan hennak da reiñ ar skouer, d'an M.R.P. eo kregiñ. Hervez "La Croix" (8-6-55) ar politikerezh a zo bet heuilhet e Sikilia, a vefe diouzh kelennadurezh ar Sosiologiezh Kristen. Ha mar teufe an taol da vat, ha perak ne zeufe ket, e lennfemp a-benn un nebeut bloavezhioù war ar c'hazetennoù : Parlamant Roazhon en deus graet muioc'h evit Breizh e-pad 10 vloaz eget Gouarnamant Pariz e-pad 100 vloaz.

3.7.55

() () () ()

A O T R O U D E P U T E !

Klevet em eus e oac'h distroet d'ar gêr, buan ha buan, pinous ha toutek evel ur c'hog dibluet ! Biskoazh ne oa bet kement a hast warnoc'h o kuitaat Pariz. Ret eo kredif eoz oc'h bet glac'haret meurbet gant ar maleur c'hoarvezet ganeoc'h.

An Aotrou Coty a zo bet didruez evidoc'h hag evit ho kenseurtes. War zigarez ez eus bet er Gambr, 318 deputé ober penn-mouz d'an Aotrou Faure, ez oc'h bet argaset eus ar Palez Bourbon evel ur bagad lamponed. N'eus skolaj na lise ebet er vro-mañ hag a gredfe ober kemend-all. An teodoù fall a lavar e vije hanval alies ar Palez Bourbon ouzh ur sirk, evit tud savet mat, evel just ! An Aotrou Coty, en, a zo sur da virout e blas, ha setu perak en deus kavet mat skarzhañ an ti, evit ma c'hello diskuizhañ e peoc'h e-pad ur mizvezh bennak.

Evidoc'h ez eo ur gont all. Koll a rit pep tra, ret e vo deoc'h e-pad ar miz-se c'houezañ dour gwad, hep bezañ sur da c'honit netra. Gout ' ouzomp mat ez oc'h un den izel a galon, ha ne rit ket forzh eus al lorc'haj a zo bet diframmet diganeoc'h en un taol evel d'un ofiser dic'hradet. Ne vefe ket gwelet ken o tont d'ar bourg amañ gant ur gokardenn triliv war ho fregatenn; ar fregatenn-se hag a lakae an dud tout da ziskrapañ ha da ziblouzañ pa zigoueze war ar blasenn e-kreiz ar foar pe ar c'homis. Gout 'ouzomp ivez, ez oc'h distag diouzh madoù an douar, pe n'ho pije klasket biken mont da zepute. Hervez ar journalioù, e vo paeet ho mizvezh deoc'h peogwir hoc'h eus labouret un dervezh pe zaou, met goude n'eus ken netra da ziraskañ. N'hoc'h eus graet nemet ur respedad, ha n'hoc'h eus ket gonezet zoken un hanter bansion. Netra goude bezañ bet depute e-pad pevar bloaz hanter, ha goude bezañ lakaet en e blom, ha diskaret ken buan all, seiz gouarnamant. Un tammig proportionnel a oa dleet deoc'h memes tra ! Marianna a zo ur vamm dinatur, ur gozh wrac'h divergont ha dic'hrad.

N'eus ken nemet un dra d'ober - klask distreiñ da Bariz. Ret e vo deoc'h gonit grasoù mat ar voterien, ha prometif d'an Aotrou Coty bezañ furoc'h. Aze emañ an dalc'h. An dud dre amañ a zo droug enne ouzhoc'h. Ar patatez a zo bet rostet hag ar priz a zo bet fall warne. Al labourerien o deus bet poan o paeañ o gouel-mikael, hag an temz-ludu. N'eus ket a labour evif ar re yaouank. Ret eo divroañ pe mont war vor. Re a vartoloded a zo ha kalz anezhe a rank chom er gêr hep fret. Ar C.E.L.I.B. en deus graet kalz evit ar vro, ha prometif a ra ober kalz muioc'h c'hoazh! Daoust hag e kav deoc'h ez eo prest paotred Pariz da zic'hodellañ arc'hant evit sevel un uzin-dre-vor war ar Rafis ? Gwelloc'h e kavont sikour marc'hadourien-win ar c'hreisteiz !

Setu trawalc'h evit ur wech. Chafis vat deoc'h, Aotrou Depute. (Betek deiz kentañ ar bloaz hoc'h eus droed da zougen an titl enorus-se). Hervez ar meteo, an amzer a vo yen ha brumennek e miz Kerzu. Diwallit diouzh ar boan-gouzoug hag ar waskedenn. Ho yec'hed a zo prizius evit amzer-da-zont ar vro.

Kenavo ha degemerit ma gourc'hemennoù leun a zoujafis.

11.12.55

()()()()

D ' U N D E P U T E B R E I Z H A T

Aotrou Depute,

Start eo bet ar c'hrogad, met n'eus forzh bremañ, setu c'hwi adarre war varc'h. Siwazh, c'hoarvezet eo bet ivez er votadegoù avel an Aviel : kal z a dud a zo bet galvet, met nebeut a zo bet dibabet ! Manet eo bet war ar gloued fri meur a hini, ha tremenet eo bet lost al leue dre c'henou ar reoù all.

C'hwi eta da vihanañ a vo e-touezh an dud evurus-se a vo degemeret hep dale e-diabarzh ar Palez Bourbon gant an Ao. Coty. Esperañs am eus ne vo ket re dreut ar soubenn gantañ, hag e c'hello gwech an amzer servijañ deoc'h un tamm friko e sal vras an Elysée. Da c'hortoz n'hoc'h eus nemet un dra d'ober : adwerzhañ ho Fregatenn. Dislivet eo, ha ret eo anzav n'eo ket diouzh ar c'hiz. Kavout a refet un noter bennak pe ur marc'hadour-loened da gemer anezhi evit hanter briz. Ret e vo deoc'h prenañ ur "Versailhenn". Honnezh a zo ur wetur : didrouz, lorc'hus, koustus, din eus un depute. Enni e vefet hanval ouzh ar Roue Loeiz XIV. Ganti e c'hellfet en un taol dispign an hanter eus ho konid. Neuze e vo tu deoc'h da ziskenn betek an Aod Glas d'ober un tamm diskuizh. Ne vo ket amzer gollet na laeret. Diviet oc'h bet sur mat gant ar brezel dre baper ha dre gomz hoc'h eus graet e-pad ur mizvezh. Ret eo krediñ ne chom ken ganeoc'h liv en ho stilo, na dour en ho kenou.

Ha neuze labour a zo d'ober. Ret e vo deoc'h ha d'ho kenseurtes bezañ en ho charreoù evit bezañ barrek da gas da benn ar programmoù kaer a zo bet peget war kement mur a zo er bourg, pe gaset dimp a vil-vern dre ar post. Kontant e vije o welout ar Gouarnamant nevez o klozañ aferioù Afrika an Nord. Kement-se a vije un tamm muioc'h a beoc'h war an douar, hag un tamm muioc'h a arc'hant a chomfe e godell Marianna. Neuze marteze ne vije jachet kement warnomp gant follennoù gwenn, gwer ha ruz ar persepter, ha stouvet e vije diouzhtu e forn vras d'an Aotrou Poujade.

Marteze e vanje ivez gant ar Gouarnamant un tamm muioc'h a arc'hant evit sevel uzinioù e Breizh. Ar Vretoned yaouank, ha n'ouzont ken peseurt micher dibab a gavfe labour enne; hag ar beizanted gwerzh d'o marc'hadourezh. Marteze c'hoazh e chomfe peadra da greskiñ o zammig aluzon d'ar skolioù kristen. N'anavezan ket liv ho porpant, gallout a rafe bezañ ruz, n'eus forzh, ma zonton Pipi a lavare alies : Tout al livioù a zo mat, Met ar Ruz eo an tad. Daoust hag ez oc'h evit ar Frankiz, pe nen oc'h ket ? Daoust hag ez oc'h demokrat, pe nen oc'h ket ? Tout ar peurrest a zo konchoù born ha na roont ket deskadurezh da silañ e pennoù hag e kalonoù hon bugale, na bara da gargañ o c'hofoù, nag ur vicher da lakaat etre o daouarn.

Ha bremañ, Aotrou Depute, evit echuiñ, e roin deoc'h c'hoazh un ali.
Mar kavit un tammig diaes ha tagnous Deputeed ar C'hreisteiz, mar klaskont difenn
ar varc'hadourien win ha glaou diwar goust peizanted ha micherourien Breizh, la-
varit Kenavo da Bariz. Ha c'hwi hag ar Vretoned all, kemerit ur bilhed e gar Mont-
parnasse evit kêr Roazhon. Aze ez eus un ti kaer ha ledan, hag a oa anvet gwechall
Parlamant Breizh. Marteze e c'hellfe, bep an amzer, degemer deputeed Breizh.

Kenavo, Aotrou Depute, chafis vat deoc'h, ha n'ankouait ket ho pro.

8.1.55

()()()()

POUR QUI SONNE LE GLAS ?

Ur wech ouzhpenn emañ Kambri an Deputeed er Frañs o klask votañ lezennoù enep ar Skolioù Libr, pe gentoc'h o klask lemel digante an tammig aluzon a vire oute da vervel gant an naon. Pa vo lammet digante o genaouad diwezhañ e varvint suroc'h hag abretoc'h. Ha kement-se, evel just, en anv "al Liberte, ar Fraternite hag en Egalite".

An Aotrounez vras-se, hag a zo kustum da veajiñ, a dlefe mont d'ober un dro e broioù libr Europa. Ne gomzan ket eus ar Republikoù Poblek en tu all d'ar Rideoz Houarn. Eno, e Hongria, e Tchekoslovakia, pe e Polonia, n'eus ken a Frankiz, nemet ar Frankiz da vervel evit ar Frankiz. Ar Sozialisted hen goar mat, kenkoulz hag ar Gatoliked ha gwelloc'h marteze. An Iliz Katolik a zo bev er broioù-se c'hoazh, met ne gomzer ken pell 'zo eus ar C'hostezennoù Socialist. Tec'het int kuit, pe aet d'an anaon. Perak eta klask heuilh skouer ar broioù-se ? Perak ne c'houlennont ket kentoc'h kentel digant Bro-Holland, pe c'hoazh an Danmark ? Pe c'hoazh Breizh-Veur ?

Gwir eo ar Fransizion a gav dezho emañ gante holl skiant vat ar bed. Tchet int zoken d'ankouaat Istor o bro. Pa oa ar Prezidant Coty oc'h ober e veaj ofisiel en Amsterdam e kredas lavarout ne oa deuet ar Frañs eno nemet gant armoù ar peoc'h. Ankouaet en doa ar Prezidant brezelioù Napoleon Gozh, an Napoleon Bras, lorc'h an holl Fransizion ! Ankouaet en doa e oa bet lodennet Bro-Holland e Departamantoù evel Frañs a-bezh. Kêr Amsterdam n'emañ ket pelloc'h eus Pariz eget Brest ! Kemend-all a c'hoarvezo gant Aljeria un nebeut bloavezhioù diwezhatoc'h. Rak spered Napoleon n'eo ket marv. Ar spered jakobin-se hag a glaske, hag a glask c'hoazh, lakaat pobloù disheñvel da blegañ d'ar memes lezennoù, da gomz ar memes yezh, da gemer ar memes kustumoù ha gizioù; hag a zo, evel just, lezennoù, yezh, kustumoù ha gizioù Pariz. Kement-se n'hell ket padout, hag e teu an traoù da strakal. Ar Frañs he deus sachet ar c'harr war he c'hein ha ne oar ken penaos en em zifretañ. Evit tud 'zo n'eo ket ponner a-walc'h c'hoazh. C'hoant o deus da sammañ war he choug ar brezelioù enep d'ar Skolioù Libr ha d'an Iliz Katolik.

An Iliz Katolik a c'hellfe gouzanv tamm pe damm; met ne varvo ket evit ken nebeut. Gwelet he deus gwashoc'h. Darn eus hor skolioù kristen a c'hellfe bezañ serret dre faot arc'hant. Met bez' ez eus er Frañs Katoliked hag o deus gwad din-dan o ivinoù. Ne lezint ket tremen lost al leue dre o genou hep gwic'hal, na gwinkal. Un tamm trouz a vo; ha n'eo ket ken sur-se piv a vo koll. War an taol e teu da soñj din eus ar film amerikan : "Pour qui sonne le glas ?" N'eo ket evit an Iliz Katolik nag ar Skolioù Libr ! Daoust hag e vefe evit ar Frañs pe ar Beder-veñ Republik ?

KOLONIOU HA KOMUNISTIEZH

Nevez 'zo Eskibien ar Sav-Heol o deus displeget e oa un dra vat evit o broioù bezañ gonezet ar Frankiz. Nebeut a-raok, Eskibien Madagaskar hag an A.O.F. o doa lavaret ivez he doa droed pep bro da glask kaout ar frankiz, hag e oa dever ar Broioù-Mistri o stummañ hag o skoliata en doare ma vefent barrek un deiz d'en em ren o-unan. An diskleriadurioù didroell-se a zo bet tamallet dezho meur a wech. Met diskouezet o deus e-giz-se e oa an Iliz Katolik a-us d'ar broioù, leun a zouj-añs hag a garantez evit an holl.

A-du gant ar menozioù-se en em gav ivez ar Gomonistiezh. E pep bro e vez harpet ar strolladoù broadel gant ar gomunisted. Hag aes eo dezho c'hoari. En holl golonioù, pe dost, ez eus milionoù a dud o vevañ er vizer. Aes eo lakaat anezho

da grediñ ez int gwallgaset gant ar Gapitalisted estren a zastum fortunioù diwar o c'houst. Pezh a zo gwir a-wechoù.

Met ur fazi a vefe dimp krediñ o defe ar pobloù-se ezhommoù korfel hepken. A-walc'h e vije bet neuze kregiñ gant Stourm ar C'hlasoù. Ar pobloù-se o deus ivez ezhommoù speredel. Fellout a ra dezho bevañ e-giz ur bobl dezhi un istor, kustumoù, arzoù ha lennegezh. Fellout a ra dezho mirout kement-tra hag a ra o fersonelezh. Ar Gomonistiezh he deus komprenet kement-se, ha setu perak e klask lakaat war droad ur Republik Algeriat, da skouer.

Diaes eo din bezañ a-du pe a-enep ur Republik Algeriat. Met kleuz e kavan ar respontcù hag ar promesaoù graet gant ar gouarnamant da c'houlennoù ar vroadelourien algeriat. Lavaret e vez dezho da gentañ ne oa Bro Algeria ebet a-raok done-digezh ar Fransizien. Pezh a c'hell bezañ gwir. Met arabat ankounac'haat e c'hell ar broioù genel ha mervel ivez. Istor Belgia n'eo ket gwall gozh, na hini Yougoslavia. D'an eil, petra a ginniger da Algeriz ? Diaes eo lavarout dre just. Doujet e vo da vihanañ o fersonelezh. Met penaos ? Ur bloaz 'zo e lavared e oa Algeria departamantoù gall. Bremañ e lavarer dimp n'eo ket zoken. Algeria ur broviñs eus ar Frañs ? Petra eo eta, a-benn ar fin ?

D'am soñj Framm ar Republik Gall a zo re strizh, ha krog eo da strakal. Ret e vo reiñ muioc'h a aer d'ar broioù disheñvel a zo o vevañ en he diabarzh. Anez se e tarzho. Hevelep tra a zo c'hoarvezet gant an Unvaniezh Gall. Gwelet hon eus o tec'hout a bep eil ar Vietnam, Tunizia hag ar Maroko. Arabat dimp kuzh ar wirionez ouzh hon daoulagad pa 'z eo ken sklaer hag an deiz. Arc'hoazh e vo tro ar C'hameroun, mar ne ziwall ket gouarnamant Pariz. Setu da vihanañ soñj an Dr Aujoulat, hag a anavez mat ar gudenn.

Un dra c'hoazh am laka nec'het. Ur vro vihan evel an Danmark he deus roet o frankiz d'ar broioù dindan he dalc'h : Island, Groenland, hag an Enez-annoù Feroe. Ha kement-se war o goulenn. Daoust hag e vefe an doare-se kontrol da spered demokratel ar Frañs ? N'on ket tamm ebet a-du gant ar brezel, nebeut-oc'h c'hoazh a-du gant ar muntroù a vez sevenet bemdeiz en Algeria, met daoust hag-eñ e vije bet selaouet mouezh Algeriz ma ne vije ket bet eilet gant trouz ar fuzuilhoù ? Lazhafi a zo sur-mat ur pec'hed. Met ur pec'hed eo ivez ober skouarn vouzar ouzh goulennoù ur bobl taget gant naon ar c'horf ha naon ar spered en doare ma laka hec'h holl esper en dispac'h hag er brezel.

17.6.56

()()()()

P A R I Z

A-walc'h eo bezañ beajet un tamm er broioù estranjour evit gouzout pegen bras ez eo brud vat kêr Pariz. Abegoù ar vrud-se a zo da glask moarvat er XVII^{et} kantved hag en XVIII^{et} pa oa Lez ar Roue-Heol Loeiz XIV, hag e warlerc'hidi o ren ar gizioù en Europa a-bezh. Betek derou an XIX^{et} kantved ez eo bet ar Galleg yezh an noblansoù hag an dud pinvidik en Alamagn, e Bro-Holland ha zoken e Rusia. Ar Galleg a zo bet c'hoazh yezh an diplomatezh betek ar brezel 14-18. Met brud vat Pariz n'eo ket graet hepken eus hec'h amzer dremenet. Pariz a-vremañ a zo dellezek eus he brud. Ken brav eo bremañ ha gwechall gwelout Iliz an Itron Varia hag ar Chapel-Santel o c'hoarzhin e-kreiz an dour, ar glazur hag ar sklêrijenn, ha ken ledan ha ken eün ha biskoazh e chom ar balioù bras evel ar "Champs Elysées". Pa anavezer muzeoù ar broioù all e chomer souezhet c'hoazh dirak pinvidigezhioù al Louvre. Talvoudus-tre em eus kavet e Palez Chaillot un diskouezadeg eus taol-ernoù-mur eus an ilizoù romanek ha gotek. Kentelius ivez an diskouezadeg statuoù a grog gant an arz romanek evit echuiñ gant hon amzer, ha pa ne vije ken nemet evit lakaat splann pegen kleuz, pegen goullo ez eo bet an arz-se abaoe ar XVII^{et}. Ret e vefe chom devezioù e Palez Chaillot ha sizhunvezhioù el Louvre evit kaout un tanva eus kement tra a zo eno.

Kement-se ne dalvez ket da lavarout e vefe bet gonezet va c'halon gant Pariz. Diviet ez on distroet d'ar gêr, ha hanter-glañv gant flaer ar Metro. N'em eus ket gwelet foukennoù ar banlevioù. Souezhet on bet avat gant niver bras, kalz re vras, ar glocharded, hag an Norz-Afrikiz. Un Algerian kastizet, gantañ un domatezenn c'hlas en un dorn, en deus lavaret din a vouezh izel an daou c'her-mañ, an daou c'her gallek a anaveze hepken : J'ai faim !

Amañ e lakaomp ivez ar biz war sioù Pariz. N'eo ket bet a-walc'h dezhi bezañ mestrez war dachenn an arzoù hag ar gizioù, dedennet he deus betek re tud ar broioù all. N'hell ken bevañ na lojañ an holl dud diredet daveti. E-keit-se e weler dre ar Frañs a-bezh muioc'h-mui a zouaroù hag a dier abandonet.

Oc'h ober ar Frañs e kaver meur a vro disheñvel en gwirionez. Pep hini eus ar broioù-se he deus he stumm dezhi hec'h-unan da ren he buhez. Nac'h kement-se hag ober gant Pariz penn ur vro vras, une et indivisible, a zo bet ur fazi bras. Lamet eo bet gant pep bro vihan pep c'hoant-bevañ, hag a-benn ar fin pep buhez. Korf ar Frañs a zo bet diwadet tamm-ha-tamm, ha bremañ ez eo dinerzhet da c'hortoz ma vo disec'het, nemet e teufe ur Reform don bennak.

Gant mall e c'hortozomp ar Reform-se, hag a lakaio etre daouarn ar Vretoned amzer-da-zont o bro vihan. Un amzer-da-zont diazezet war an amzer-dremenet; eno emañ evidomp-ni hent ar wirionez ha maen-font an evoluadur gwirion. Eno emañ silvidigezh Breizh. Eno emañ silvidigezh ar Frañs.

R U G B I

Pa gemer an den ur gazetenn e lenn pezh a gar. Kalz a dud a lenn hepken pajenn ar sportoù; me a lenn pep pajenn all nemet honnezh ! En desped din, dre ar radio hag ar sinema, em eus graet anaoudegezh gant ar Rugbi. Kement-se avat n'en deus ket desket din ar reolennoù ha ne dalvez ket gwelout c'hoari en gwirionez. Kurius a-walc'h ez on dre natur, ha karout a rafen mont d'un abadenn bennak, ha pa ne vije ken nemet evit gellout lavarout em bije gwelet unan em buhez !

Klevet em eus eta, ha lennet em eus zoken war bajenn gentañ "La Croix" - n'hell ket an den serrif e zaoulagad war bep tra - e oa bet gonezet Tournamant ar Pemp Bro gant ar Frañs ha Kembre. Ma lakafen dindan ho taoulagad ur gartenn vut eus Europa, daoust hag e c'hellfec'h diskouez din pelec'h emañ ar vro-se ? (Savit ho fri diwar an tamm paper-mañ ha klaskit ur pennad). Ha bremañ setu ar respont reizh. Kembre a zo ul lodenn eus Breizh-Veur, etre Cardiff ha Liverpool. Bro-Saoz a zo ivez ul lodenn eus Breizh-Veur; ha Bro-Skos ivez.

Met n'eo ket hepken ur strollad Rugbi a gaver e Kembre. Bez' he deus ivez ur yezh, ar C'hembraeg, a vez kelennet en holl skolioù; peder skol-veur, ul levr-abueg ha daou vuze broadel... Gwelet em eus gar Cardiff kempennet gant bannieloù ar vro - un aerouant war glas-sklaer - e 1951, en enor da Festival Breizh-Veur. Bro-Gembre a zo ivez un dukelezh, hag an titl a vez douget gant danvez-roue Breizh-Veur. Ar bloaz-mañ e vo anvet ar priñs Charlez Duk Kembre gant e vamm, ar Rouanez Elisabeth.

Gant aon na ouijec'h ket, e lavarin deoc'h c'hoazh e oa bet gonezet match diwezhañ an Tournamant gant Kembre. Kement-se en deus lakaet desped e kaloncù sportourien ar Frañs ha Breizh ! Me avat, a zo bet laouen ! a-drugarez Doue ez eus c'hoazh, war an douar-pri-mañ, en amzer ar vombezenn h, tachannoù e-lec'h ma c'hell ar broioù bihan trec'hiñ war broioù 10 gwech brasoc'h egeto.

17.4.55

(()) (()) (())

KELEIER EUS KEMBRE

Gant eured ar Prifis Rainier hag an Dimezell Grace Kelly, n'o deus ken amzer ul lodenn vras eus ar Fransizien da soñjal en darvoudoù a-bouez evel brezel Algeria ha bizit Boulganine ha Kroutchev e Londrez. C'hoant am eus koulskoude da gomz ar sizhun-mañ eus un nebeut keleier deut dimp nevez 'zo eus Bro-Gembre, hag a zo ivez a dalvoudegezh evit ar Vretoned.

Evel pep bloaz, d'an 28 a viz Ebrel, Radio Cardiff he deus embannet "Gourc'hemenoù a Beoc'h" kaset gant yaouankiz Kembre da holl yaouankizoù ar bed; "Bezomp laouen o welout kement a dud, paotred ha merc'hed a bep bro hag a bep ouenn, oc'h ober o gwellañ evit eskumunugañ ar brezel eus ar bed. Fellout a ra dimp ur bed e-lec'h ne vo ken distrujet milionoù a dier, hag e-lec'h ne vo ken bugale vihan o faminañ. Fellout a ra dimp ur bed e-lec'h ma kenlabouro an holl vroioù an eil gant eben evit mad an holl". Warlene 17 bro - en o zouezh 2 eus an tu all d'ar Rideoz-Houarn - o doa respontet d'ur seurt galv.

Tud Bro-Gembre a sell outo o-unan evel ouzh ur bobl disheñvel diouzh ar Saozon. Kembre he deus he yezh, hec'h istor, he c'hudennoù ekonomikel ha kulturel dezhi hec'h-unan. Hag evit o diskoulmañ e kav dezhi he dije ezhome eus ur Parlamant. Gouarnamant Londrez a nac'h - betek-hen da vihanañ - met 80% eus an dud a sin bezañ a-du gant ur Parlamant evit Kembre. E penn ar c'houlennadeg vras-se e kaver an Itron Megan Llyod George, merc'h ar ministr kozh ken brudet, an Ao. Clement Davies, rener ar Gostezenn Liberal, hag un nebeut deputeed eus Kostezenn al Labour. Kostezenn al Labour a zo an hini greñvañ e Kembre. Kembreiz a lavar e vo ret da Londrez plegañ da reiñ dezho o mennad, ha sevel ur Parlamant e Cardiff, a zo bet anvet da gêrbenn nevez 'zo.

E-pad ar bloaz tremenet ez eo bet advoulet ur bibl nevez evit ar skolioù; 20.000 skouerenn a zo bet embannet ! Daoust ha kavet e vije 20.000 skouerenn eus ar Bibl, Levr al Levrioù, e skolioù kristen ar Frañs ? Ne vije ket moarvat. Kembreiz - hag o deus war ar poent-se muioc'h a chafis eget ar Vretoned - o deus ur bibl en o yezh abaoe 1588. Hag evel e kalz a vroioù protestant, yezh ar Bibl a zo deut da vezañ yezh al levrioù. Ar Bibl nevez n'eo ket un droidigezh nevez. Klasket ez eus bet hepken reizhañ an doare-skrivañ, a oa koshaet a-wechoù, hag ivez un nebeut fazioù a oa en em silet dre forzh amzer. Al levr a zo bet moulet e Londrez war gont Kevredigezh ar Bibl. Pemp ger saozneg hepken a zo bet moulet war al levr. Kembreiz hag a zo pismig - hag a oar petra eo an humour - o deus tamallet ar pemp ger saozneg d'an embannerien.

22.4.56

()()()()

A R V O M B E Z E N N H

Ar C'hentañ Ministr Edgar Faure en deus disklêriet ne glaskfe ket ar Frañs aozañ bombezennoù atomek pe bombezennoù H. Kontant bras on eus kement-se evel breizhad.

Da gentañ ha dreist-holl evel kristen. A-raok kuitaat e garg a gentañ ministr, en doa disklêriet Sir Winston Churchill e vefe aozet bombezennoù H e Breizh-Veur. An Eskibien diouzhtu o deus degaset da soñj e oa bet kondaonet an armoù nukleek gant Hon Tad Santel ar Pab, ha ne oa ket permetet zoken o implij evit en em zifenn hepken. An armoù-se a zistruj pep tra : tud, loened ha madoù. Ur journal katolik Saoz a lavar c'hoazh ouzhpenn n'eo ket permetet d'ar gristenien labourat en uzinioù a aoz ar bombezennoù-se. Ar soudarded a dle nac'h, kousto pe gousto, implij seurt armoù.

D'an eil evel Breizhad. Ar brezelioù tremenet n'o deus degaset gonid ebet da Vreizh, e stumm ebet. Pep brezel a zo bet un digarez evit gouarnamant Pariz da astenn e grabanoù war hon bro. War-lerc'h pep brezel ez eo deut ar Vretoned, un tamm muioc'h bep tro, da ankouaat e oant Bretoned. Kement-se n'en deus ket graet vad da Vreizh na d'ar Frañs. Izili klañv a zo e diabarzh ar Frañs. Siwazh ! Breizh a zo unan anezho. Ha pa vez klañv un ezel bennak, ar c'horf kennebeut ne vez ket yac'h.

Ar vombezenn H, hag an holl armoù nukleek, a zo e pign a-us d'hon fenn evel gwechall ar c'hleze a-us da benn Damoklès. Evit stourm enep follentezioù an dud ne chom ken gant ar Gristenien nemet armoù ar bedenn, da lavarout eo armoù Doue krouer pep nerzh hag ivez an nerzh atomek !

1.5.55

()()()()

B A N D O U N G

Souezhet e chomer gant niver an dud a liv a vez gwelet e kêrioù bras Bro-Holland. Un deiz e c'houlennis displegadurioù. Respontet e voe din e oant hironed, tud ganet eus dimezioù etre Europiz hag Indoneziz. Pa voe krouet Stadoù Unanet Indonezia e voe ret d'an estranjourien ha d'an hironed choaz etre an daou dra-mañ: bezañ naturalizet ha chom er vro, pe mont kuit. Kalz a yeas kuit.

Darn a chomas. En o zouezh ar visionerien. Anavezet em eus unan anezho, deut da ziskuizhañ e ti e dud. Ur pasport Indoneziate a oa gantañ. Evel un estranjour e oa bet degemeret en e vro c'henidik. Evit mont da v-Belgia e oa ret dezhañ goulenn ur visa digant ar c'honsul, ha paeañ, evel just; ha koulskoude e c'hell Hollandiz mont da v-Belgia gant n'eus forzh peseurt kartenn-ano. Karout a rae avat tud e vro nevez. Karout a rae he yezh. Komz a reas din pell eus ar yezh izel-se a oa deut e berr amzer da vezañ ar yezh ofisiel ha yezh an holl skolioù. Tamm ha tamm e veze distroadet an Hollandeg gant an Indonezieg. Ar misioner-se a oa ur gwir Indoneziate, n'eo ket hepken war baper mat ivez en e galon.

Kement-se a zo deut da soñj din pa lennen keleier ar c'hazetennoù diwar-benn Konferañs Bandoung, en enezenn Sumatra, unan eus Stadoù Unanet Indonezia. Bodet e oa eno ministred eus Azia hag Afrika. Gwelet a-bell, broioù heñvel a-walc'h. Gwelet a-dost, broioù disheñvel a-grenn a-wechoù. Disheñvel dre o doare-gouarnamant, o ezhommoù hag o finvidigezhioù naturel. En gwirionez ne oa ket kalz a dra d'o unanif nemet o disfiziañs ouzh Europa hag Amerika. An "Osservatore Romano" a lavare dimp ne oa ket hep abeg.

Disfiziañs ouzh an dud gwenn. Disfiziañs ouzh o relijion, ar relijion gristen. Aze emañ an droug. Darvoudoù evel konferañs Bandoung hon laka da soñjal.

8.5.55

()()()()

CHURCHILL

E Breizh-Veur e oan. Dirazon er bus, e oa azezet ur plac'h yaouank a zouge ur skerb war he fenn. Pezh n'oa ket souezhus tamm ebet. Met war ar skerb-se, e oa bet moulet, meur a wech, ur frazenn hag a oa sinet : Churchill. Setu-hi amañ : "Never had so many owed, so much to so few". ("Biskoazh, kement a dud o doa dleet kement da gennebeut a dud"). Er frazenn vrudet-se, Churchill a c'hoari gant ar gerioù, hag al lennerien a oar un tamm Saozneg o devo plijadur ouzh he lenn. Meulfi a ra an nijerien o doa difennet kêr Londrez e-pad ar brezel. Anv Churchill a chomo stag ouzh stourm Breizh-Veur enep an Alamagn. E anv a chomo stag ivez ouzh istor ar "British Empire". Bevet en deus hec'h eurioù gloriusañ en amzer ar Rouanez Victoria. Bevet en deus ivez hec'h eurioù diwezhañ !

Un dra avat a chomo : ar c'h-Commonwealth, ha mestroni ar Saozneg war ar bed. Ar c'h-Commonwealth, Unvaniezh ar Broioù a zo bet gwechall dindan gazel-gae gant ar Saozon, n'eo nemet ur skeud eus ar "British Empire". Broioù evel ar C'hanada pe Republik Bro-Indez a c'helle derc'hel penn ouzh o mestrez gozh. Koulskoude an unvaniezh a chom a-walc'h : kurunidigezh ar Rouanez, ha bodadegoù ministred ar c'h-Commonwealth hen diskouez sklaer.

Un dra a chom c'hoazh : ar Saozneg. En holl vroioù hag a rae gwechall ar "British Empire", ar yezhoù kozh a vez implijet muioc'h-mui er skolioù hag er vuhez ofisiel. Ar Saozneg a chom yezh an darempredoù etre holl vroioù ar bed koulz lavarout. Bez' ez eo yezh ar c'hoñvers hag an diplomaterezh.

Ur plac'h yaouank eus Aostralia a lavare din ur wech : "Gant ma dek biz ha ma Saozneg e c'hellan ober tro ar bed". Churchill a vefe bet lorc'h o klevout unan eus sujidi ar Rouanez Elisabeth o komz evel-se.

24.7.55

()()()()

D A S. M. B E N Y O U S S E F

Aotrou Ben Youssef,

Seblantout a ra din ec'h anavezad ac'hanoc'h kenkoulez ha maer va c'humun ha setu perak ne gavan ket e vefe dizoujus eus va ferz kas deoc'h ur ger. Kustum omp bremañ d'ho kwelout bemdez war ar journalioù gant ho lunedoù tefival, ho pisaj yaouank ha c'hoarzhus hag ho kravatenn zu. N'em eus ket bet an enor - ha n'em bo biken moarvat - da stardañ deoc'h an dorn evel ar Prezidant Coty, pe da vriata ac'hanoc'h evel an Ao. Ministr Pinay, pe c'hoazh da boket d'ho treid evel arGlaoui.

Ha peogwir e teuan da vezañ un tammig hardiz ouzhoc'h, e c'houlennin diganeoc'h c'hoazh hag-en n'hoc'h eus ket kavet souezhus, ha zoken fentus, gwelout an dud vras-se o tont, an eil war-lerc'h egile, d'ober ardoù deoc'h ? Daoust ha n'eo ket ar Glaoui-se en doa diskaret ac'hanoc'h diwar ho tron uhel ha santel ? Daoust ha n'eo ket ar Prezidant Coty - ho mignon evel ma plij deoc'h eñvel anezhañ - en doa kaset ac'hanoc'h, buan ha buan, da ziskuizhañ da Vadagaskar, da wellaat ul lamm tapet fall ? ha hep goulenn hoc'h ali diganeoc'h, evel just, evel pa vijec'h bet ur bugel pe un inosant.! hag-en n'eo ket an Aotrou Pinay a lavare a vouezh uhel e-pad an eost ne zistrojec'h biken war ho tron er Maroko ?

Holl, evel just, o deus lavaret deoc'h e oant laouen d'ho kwelout en-dro, gwellaet, diskuizhet ha zoken stummet mat. Tud ma bro a zo kontant ivez. Ho vakansoù e Madagaskar a gouste ker dimp. Ret e oa lojañ ha bevañ ac'hanoc'h evel ur roue, hag ober war-dro ho familh a gavomp un tammig hir. Kontant omp c'hoazh o soñjal e teuo adarre ar peoc'h hag ar frankiz da ren en ho pro. (N'omp ket hepken tud tost d'o yalc'h). Kement-mañ a ziskouez ez eo krog gouarnamant Paris da gompren n'en deus ket droed tamm ebet da lemel digant ar pobloù all o yezh, hag o sevenadurezh ha d'o ren evel pa vefent kondaonet da chom en o bugaleaj betek fin ar bed. Marteze e teuo ivez gouarnamant Paris da gompren n'hell ket en em harpañ war tud skañv ha digalon evel Bao-Dai, met war ar re hag a gar o bro en gwirionez, hep marc'hata daoust ma seblantont a-wechoù pennek.

Ha bremañ, Ao. Ben Youssef, e lavaran deoc'h Kenavo. Mar em eus skrivet deoc'h komzoù un tammig rust, diardoù, ha n'int ket diouzh doare ar protokol, surmat e vin pardonet ganeoc'h peogwir hoc'h eus pardonet a galon vat d'an Aotrou Pinay ha d'ar Glaoui.

27.11.55

()()()()

ALAMAGN ADENAUER

Pa zegouezer en ur vro estren, ez eo brav santout war ar skoaz dorn un den hag a vo evidoc'h un hencher e-pad meur a zevezh. Setu ar pezh a c'hoarvezas ganin e gar Mayence. Hag o treiñ ma fenn e welis ur beleg yaouank ha gwisket brav a oa deuet da benn-hent din evit kas ac'hanon betek ma lojeiz. Ur mousc'hoarzh ledan a oa gantañ war e vizaj, galleg ponner a-walc'h war e vuzelloù, ha bilhedoù tram en e zorn. Ha ni war-raok war-du Skol-Veur Gutenberg. Evit ar re o deus ankounac'haet o zammig istor e lavarin e oa bet ganet Gutenberg e Mayence. Tier ar Skol-Veur ne oant ken nevez-se, peogwir e oant gwechall ur c'hazarn. Setu an Alamagn Nevez, eme ma hencher !

En Alamagn an Nord em eus baleet e-kreiz kazarnioù leun a familhoù divroet eus ar Prus, ha bet on bet zoken o troc'hañ ma blev en kaoutell ar gward ! En kêr Flensbourg koulskoude, e-kichen harzoù an Danmark, e chome goulo ur c'hazarn bras : e oa o c'hortoz soudarded nevez an Alamagn. An Danad, a gonte kement-se din, a oa leun e gomzoù a dristidigezh. Evel p'en dije bet aon c'hoazh. Ne gav ket din e vije prest speredoù an Alamaned da gemer perzh e brezelioù nevez : re o deus bet gouzanvet war-lerc'h an hini ziwezhañ.

Pa weler fotoioù eus kêr Kologn, kemeret er bloaz 1945, pa oa distrujet an tri-c'hard anezhi, ha kêr Kologn evel m'emañ bremañ, e chome souezhet-mik. Diaes eo krediñ e vefe bet gallet, e ken berr amzer, adsevel ken lies a dier, ken lies a bontoù. War ar ruioù bras e kaver stalioù ken pinvidik, ha ken pourvezet mat ha re Bariz. Gwerzhañ a refont deoc'h, kalz marc'hadmatoc'h eget e Pariz, dilhad-dindan, gwiskamantoù, hag ar binvioù-foto o deus graet brud vat an Alamagn. Met, pa'z eer donoc'h e kêr, e tizoloer murioù mac'hagnet ha noazh, bernioù brikennoù zenket mat e-kreiz ar glazur hag ar bleuñv alies. N'heller ket ankouaat ez int rivinoù ar bombezadegoù, hag e kuzhont c'hoazh marteze meur a gorf-den.

Eus an 22 iliz kozh n'eus ket unan moarvat hag a vefe chomet divlam. Dirak an Iliz-Veur, e tro, a-hed an deiz, div rod-lotiri ken uhel hag ur gar-foenn. Fa lennit warne ar c'homzoù-mañ : "Klaskit ho chafis, ha sikourit an iliz-veur !" e prenit diouzhtu daou pe dri vilhed. Mar doc'h chansus e c'hellit gonid eus an div "Opel"se hag a zo lorc'h an holl Alamaned. En Iliz-Veur a c'hellit gwelout relegouer-aour ar Rouanez, ha taolenoù Stefan Lochner, diwallet gant ur rejimanted sakristed gante togoù du uhel, ha porpantoù ruz hir. Ne zougont avat na halabardenn na kleze, astenn a reont deoc'h un tamm kokenn ! "Sikourit an Iliz-Veur" met an dro-mañ n'eus "Opel" ebet da c'honid !

E Franckfort ez ec bet adsavet a-blaen ti Goethe; hag e Münster, an ti-kêr ma voe sinet ennañ emglev Wesphalia. Pep tra a zo bet adaozet evel gwechall, zoken

an disterañ tach kouevr. Rak ret eo degas da soñj d'an Alamaned yaouank eus amzer dremenet o bro; reiñ dezho fiziañs en amzer-da-zont, hag ivez sachañ an douristed er vro.

Setu an Alamagn Nevez, Alamagn Adenauer. Kement-se ne dalvez ket da lavarout e vefe an holl a-du gantañ. Tamall a reer dezhañ a-wechoù e vefe bet graet ar pezh a anver "ar Burzhud Alaman" diwar goust al labourerien. Pa oan en tren war hent ar ger, e tichansas din bezañ e-kichen daou vicherour. War ar journal a lennen e welent ur foto bras eus Adenauer o vont da Voskou. Dre jestroù ha dre gomzoù, ha na oant ket tener, e tiskouezjont din o c'hasoni evit an den kozh. Met piv war an douar-mañ a vefe karet ha doujet gant an holl ?

15.1.56

()()()()

I-Kudennoù kulturel ha relijiel:	
1- David ha Goliath	p. 3
2- Devezh ar Brezhoneg	p. 4
3- Ar Joa war ar Maeziou	p. 5
4- Radio Rcazhon	p. 6
5- Yann-Vari Perrot	p. 7
6- Dir-Na-Dor	p. 8
7- Guy Ropartz	p. 9
8- Dacu Romant	p.10
9- Un Nevezinti Vat	p.11
10- Keleier eus Holland	p.13
11- An Iliz hag ar Yezhoù	p.14
12- Merc'hed Breizh	p.15
13- Sant Gall ha NI	p.16
14- Devezhioù-studi e Ploueg-Ar-Mor	p.17
15- Divroet	p.18
16- Ar B.E.P.C.	p.20
17- Joergensen	p.21
II-Lennegezh, Embannadurioù:	
18- Va Zammig Buhez	p.23
19- " Ar Vro "	p.24
20- Ar Maout gant Tregeriz	p.25
21- D'an Aotrou Jarl Priel	p.26
22- Ar Bibl e Brezhoneg	p.27
23- Greomp Bruderezh	p.29
24- Levrioù Brezhonek	p.30
25- Levrioù evit Bugale	p.32
26- Nedeleg Breizh (kentañ pennad)	p.33
27- Nedeleg Breizh (eil pennad)	p.34
III-Kudennoù Kevredigezhel:	
28- Butun ha Koka-kola	p.35
29- Ar Beleg Du	p.36
30- Hag hor Patatez ?	p.38
31- Hentoù Stouvet	p.39
IV-Kudennoù Politikel:	
32- Demokratelezh	p.41
33- Da z-Daniel Rops	p.42
34- " Justice est faite "	p.43
35- Skouer Sikilia	p.44
36- Aotrou Depute !	p.45
37- D'Un Depute Breizhat	p.46
38- " Pour Qui Sonne le Glas ? "	p.48
39- Kolonioù ha Komunistiezh	p.49
40- Pariz	p.51
V-Kudennoù Etrekeltiek hag Etrevroadel :	
41- Rugbi	p.52
42- Keleier eus Kembre	p.53
43- Ar Vombezenn H	p.54
44- Bandoung	p.55
45- Churchill	p.56
46- Da SM.Ben Youssef	p.57
47- Alamagn Adenaouer	p.58

REMER-MOULER-MEROUR

Direct.-Imprim.-Gerant : Armand LE CALVEZ, PLOUEZEC. C D N.

Dépôt légal : 4^e trim. 1961.

Périodique inscrit sous le N°35 323.

- 6 — « *Daou vloavezhiaed e Skol St Erwan* (pennadoù ha danevelloù e pemp yezh : brezhoneg, galleg, kembraeg, iwerzhoneg ha saozneg) » (32 paj.) . 2,00
- 7-8 — « *Krennlavariou* » dastumet ha renket gant F. KERVELLA (112 paj.) 6,00
- 9 — « *Kanaouennoù Santel ha Komplidoù ar Sul* » gant Maodez GLANNDOUR 4,00
- 10 — « *Ar C'hembraeg hag ar Skol* » gant A. Ar C'HALVEZ (72 paj.) 4,00
- 11 — « *Face au Problème de la Culture* », un dastumad pennadoù e galleg, diwar-benn kudennoù ar C'hultur e Breizh (48 paj.) 3,00

DA VEZAN EMBANNET E 1961 :

- « *Istòr al Lennegezh Vrezhonek dre an Testennoù* » gant F. ELIES (200 paj.) - 8,00 lur nevez.
- « *Prizoniad er C'haokaz* » gant L. TOLSTOI, lakaet e brezhoneg gant Youenn OLIER ha skeudennet gant An TIMEUR.
- « *Evezhiadennoù war c'heriadur brezhonek-gallek Roparz Hemon* » gant F. KERVELLA.

10 % ouzhpenn evit ar mizoù-kas
Distaol pa gemerer meur a skouerenn

WANIG ha WENIG

kelaouenn drimiziek evit ar vugale
10 pajenn leun a skeudennoù hag a bennadoù plijus
Priz ar c'houmanant : 2,00 lur nevez da gas da
Gont-red *Journal Wanig ha Wenig*, Roazhon 1705-96

SKOL

- ★ dastumadenn a gelenouriezh embannet gant Arm. Ar C'halvez, rener Skol Sant-Erwan Plouézec (Côtes-du-Nord).
- ★ Priz ar c'houmanant : 10,00 lur nevez da gas d' ar Gont-red-Post : *Revue Skol*, Plouézec, niv. : 1911-86 Roazhon.

EMBANNET BETEK-HEN

Rummad kozh :

Niv.		Priz
1	— « <i>Ar C'hembraeg e Skolioù Kembre</i> », ur rummad studiadennoù gant A. Ar C'HALVEZ (26 paj.)	2,00
2	— « <i>Kelennadur ar Frizeg</i> » gant A. Ar C'HALVEZ (30 paj.)	2,00
3	— « <i>Douaroniezh Vreizh</i> » gant an Ao. GUILCHER, eus Skol-Veur Pariz (30 paj.)	2,00
4	— « <i>300 Divinadell</i> » (24 paj.)	2,00
5	— « <i>Rimadelloù hag unangomzoù</i> » (32 paj.)	2,00
6	— « <i>Kudennoù ar skolioù er Slesvig</i> » gant A. Ar C'HALVEZ (32 paj.)	2,00

Rummad nevez :

1	— « <i>Skol Sant Erwan</i> » (Istor Skol St Erwan) .. diviet	
2	— « <i>Nedeleg en Breizh</i> », Pevar fezh-c'hoari gant Jarl PRIEL (54 paj.)	3,50
3	— « <i>Danevelloù diwar-benn Skol Sant Erwan ha Bleun Brug Treger</i> » (20 paj.)	2,00
4	— « <i>Kontadennoù kozh he nevez</i> », ul levr klok da gelenn ar yezh ar gêr hag er skol, gant A. Ar C'HALVEZ (116 paj.)	6,00
5	— « <i>Danevelloù a bep seurt</i> ». Testennoù ar bladenn « <i>Rimadelloù ha kanaouennoù evit ar vugale</i> » (24 paj.)	2,00

LEVRIOU AR VUGALE

1. PAOTR E VARO GLAS	<i>diviet</i>
2. MERC'HIG AR ROZENN	<i>diviet</i>
3. AR C'HEMENER BIHAN KALONEK	1,80
4. ROBINSON KRUSO	1,80
5. ISTOR MEUDIG	1,50
6. AR GOANTENN E KOAD AR C'HOUSK	1,50
7. AR C'HAZH GANT HEUZOU LER	1,50
8. LUDUENNIG	1,50
9. KABELLIG RUZ	1,50
10. GWENN-ERC'H HAG AR SEIZH KORRIG	1,50
11. KISTINENN	2,00
12. GWENNIG HA GWENOLA	2,00
13. MOJENNOU	2,00
14. KROC'HEN AZEN	2,00
15. AR C'HAVR HAG HE GIVRI BIHAN	2,00

Goulenn al levrioù-se digant

P. BODENAN

Verger Saint-Yves, Stang ar C'hoad

Kerfeunteun - Quimper

C. C. P. 212-23 Rennes



TRI LEVR NEVEZ

a zo deut er-maez e dastumadenn LEVRIOU AR VUGALE

Levrioù skrivet mat hag aes

Levrioù skeudennaouet kaer-dispar (12 skeudenn liesliv e pep hini)

*Evit goulenn an 3 levr nevez embannet, hag ar re all ivez,
kasit ar follenn-mañ da Ber Bodenan, goude leuniañ anezhi.*

da PER BODENAN

Verger St Yves, Stang ar C'hoad

KERFEUNTEUN - QUIMPER

(C.C.P. 212-23 Rennes)

Kenvroad ker,

Kasit din mar plij al levrioù am eus merket gant ur groaz war ar roll en tu all. Dirak pep hini em eus merket an niver skouerennoù am eus ezhomm. Kas a ran deoc'h ur chekenn evit lur nevez.

Setu amañ va anv ha va chomlec'h :

.....
.....
.....
.....
Deiziad :

Sin. :

